

Sul ar Bleuniou hag ar Basion	127-148
Prosesion ar Bleuniou	127-133
Overenn gand Aviel ar Basion	133-147
Orezonou ha Prefas	148
Ar Zul Fask	149-157
Prefasou ar Zul Fask hag an Amzer Fask:	157-159
<u>Eil sul</u> ar Pask	160-164 --- <u>Trede sul</u> ar Pask:
165-171	
<u>Pevare sul</u> ar Pask	172-175 --- <u>Pemped sul</u> ar Pask
176-179	
<u>C'hwehved sul</u> ar Pask	180-184 --- Gouel ar <u>Yaou-Bask</u>
185-190	
<u>Seizved sul</u> ar Pask	191-194.

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 12 a viz meurzh 1971.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

NOTA. - Ar Haier da zond ne vo kaset nemed d'ar re o devo paeet o skodenn.

Ar gartenn-chek ho sikouro da gaoud sonj. Bennoz Doue deoh!

SUL AR BLEUNIOU hag AR BASION

*** Al lid penn-da-benn ---
diwar "Missale Romanum"

- 1* En deiz-mañ eo bet antreet Mab an dén e kêr Jeruzalem evid seveni Mister e Bask (da lavared eo, e varo hag e adsao da veo). Rag-se, en oll overennou, e tleer digas da zoñj euz an donedigez-se: araog an overenn vrasa, gand ar brosesion pe gand an antre solanel; en overennou all, gand an antre plên. Evelato, en overennou all-se, ma vez eun niver braz a dud, e heller ober c'hoaz an antre solanel, med ar brosesion ne vo ket grêt eun eil gwech.

A) AL LID GAND PROSESION

- 2* Erru an eur, eh en em gav an dud el leh merket, en diavêz d'an iliz, bodou palmez, beuz pe lore, en o daouarn.
- 3* Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e zervicha, a zigouez éno ive, gwisket evid an overenn gand dillad liou ruz.
- 4* Da zigeri al lid, e kaner an antivonenn-mañ, pe eur han all:
Hozanna 'vid Mab David! Benniget an hini a zeu én ano Doue!
Roue Israel eo! Hozanna e barr an neñvou!
- 5* Salud ar beleg d'ar bobl, ha kekentelig diwarbenn ar gouel, evelhénn

pe demheñvel:

Va breudeur kêr, epad ar Horaiz-mañ on eus nevezet or halonou, dre ar bedenn, ar binijenn hag an oberou a garantez. Emaom amañ hirio, unanet gand an Iliz a-bez, evid digeri ar zizun zantel, a lidom enni mister braz Pask Or Zalver.

Araog peurechui ar mister-se euz or zilvidigez, o vervel war ar groaz hag o sevel beo euz ar béz, Or Zalver a zo bet antreët gand lid braz e kêr Jeruzalem. An donedigez-se a lidom bremañ adarre, evel beb bloaz. Gand feiz ha gand gwir garantez, ni a gerzo da heul Jezuz Krist: unanet gantañ en e varo, e kavim on lod ivez en e adsao da veo hag en e vuez nevez.

6* Ar bedenn war ar bobl a lavar goudeze, unan euz an diou-mañ:

- a) Pedom Doue.- Doue oll-halloudeg ha peurbadel, plijet ganeoh + benniga ar bodou hag ar skourrou-mañ; * goude m'on-no kerzet laouen da heul Jezuz Krist, or Roue, grit deom mond gantañ beteg Jeruzalem ar baradoz. Eñ on Doue beo ha leun a hloar, a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.
- b) Pedom Doue.- Lakit da greski, Aotrou Doue, feiz an dud a esper ennoh, ha selaouit en ho madelez ar pedennou a reont a wir galon: ni hag a zo hirio o tougen palmez ha bodou lore en enor d'Or Zalver, grit deom digas deoh frouez on oberou mad, o chom unanet gantañ bepred. Eñ on Doue beo ha leun a hloar, a oll-viskoaz da virviken.- Amen.

7* Neuze e lenner Aviel an donedigez da Jeruzalem, amañ hini ar bloavez C :

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (19/28-40)

- 28. En amzer-se, edo Jezuz oh ober hent gand e ziskibien, eñ en o raog, evid pignad da Jeruzalem.
- 29. P'eo bet digouezet tost da VETFaje ha da Vetani, a sko war ar menez anvet Menez an Olivez, e-neus kaset daou euz e ziskibien, en eur lavared dezo:
- 30. "It d'ar gêriadenn a zo dirazoh; en eur vond e-barz, e kavoh eun azen yaouank ouz ar stag, ha n'eus bet c'hoaz dén azezet war e gein.

Distagit anezañ da zigas amañ.

- 31. Ma houlen unan bennag ouzoh perag hén distagit, respontit evelhenn: "An Aotrou e-neus ezomm anezañ."
- 32. Mond a reont eta, ha kavoud an traou evel m'e-noa lavaret Jezuz.
- 33. P'edont o tistaga an azen yaouank, e vistri a houlenas outo: "Perag e tistagit-hu an azen yaouank?"
- 34. Hag int-i da respont: "An Aotrou e-neus ezomm anezañ."
- 35. Hen digas a reont da Jezuz, teurel o mantilli war e gein, ha lakaad Jezuz d'azeza warnañ.
- 36. Dre ma 'z ee, e lede an dud o mantilli war an hent.
- 37. Jezuz a oa dija war diribin Menez an Olivez, pa 'z eo staget an niver braz a ziskibien a oa éno, leun a joa, da veuli Doue a vouez uhel evid an oll vurzudou o doa gwelet, en eur lavared:
- 38. "Meuleudi d'an hini 'zo o tond, eñ or Roue, en ano an Aotrou Doue. Peoh en neñv, ha gloar dreist an neñvou!"
- 39. Lod Farizianed, euz a douez an dud, a lavare da Jezuz: "Mestr, gourdrouzit 'ta ho tiskibien."
- 40. Hag eñ a respont dezo: "M'hen lavar deoh, ma teu ar re-mañ da rei peoh, ar vein eo a youho."

8* Goude an Aviel, e heller ober eur brezegenn verr. Neuze, ar beleg a lak ar * brosesion da loha, gand eun ali evel hemañ, pe gand komzou heñvel:

Va breudeur kër, d'on tro bremañ, greom da Jezuz kén braz enor ha m'o doa grêt tud an amzer-se e Jeruzalem. Deom en hent war-lerh ar groaz.

9* E penn ar brosesion e kerz ar groaz. Da genta war e lerh, e teu ar beleg hag ar re 'zo ouz e zeervicha, ha goudeze ar bobl. Epad ar brosesion, e kaner ar pezh a zo merket amañ, pe kanou all :

* Antivonenn 1 (gand ar Salm 23, dreist-oll gwerzadou 7-10)

Bugale an Hebreed, bodou olivez ha palmez en o daouarn,
'zo eet a-benn hent d'ar Zalver, en eur gana a bouez penn:
Hozanna e barr an neñvou!

* Diskan kinniget evid ar Salm 23 (ton el levr Kant. n° 50 pe 76)

Enor ha gloar da Vab Doue,
Jezuz, or Mestr hag or Roue!
Ni 'vo dezañ 'pad or bue.

7. Savit uhel tal an noriou, 9. (evel ar gwerzad 7)
Dibradit, doriou peurbaduz,
Ma teuo tre 'r Roue a hloar.

8. Piou eo hennez, roue a hloar? 10. Piou eo hennez, roue a hloar?
An Aotrou eo, kreñv ha dispont, An Aotrou Doue, mestr ar bed,
An Aotrou, dispont en emgann. Hennez eo ar Roue a hloar!

* Antivonenn 2 (gand ar Salm 46 - troet evid mond war don Kant. n° 155 -

Bugale an Hebreed a lede o mantilli war an hent hag a gane
a bouez penn: Hozanna 'vid Mab David! Benniget an hini a zeu
en ano Doue!

Salm 46 penn-da-benn:

2. Oll boblou ar bed, stlakit ho taouarn,
ha savit ho mouez da veuli Doue.
3. Bez' eo an Aotrou mestr doujet peb tra,
roue braz an douar a-bez.
- 4-5. Ar broiou a lak da blega dezañ,
poblou an douar 'zo e-harz e dreid.
Ni e-neus choazet 'vid e heritaj,
gloar Jakob, e vuia-karet.

6-7. Doue 'zav d'an neh 'kreiz eur mor a gan,
ouz son an drompill an Aotrou a bign.
Kanit da Zoue, kanit gloar dezañ,
kanit oll enor d'or Roue.

8-9. Roue eo Doue war ar bed a-béz,
e rouantelez eo an oll vroiou.
Savit kanou kaer d'an Aotrou Doue,
azezet war e dron santel.

10. Mistri ar poblou 'zeu d'en em staga
ouz pobl Abraham choazet gand Doue;
E dorn Doue 'mañ tud kreñv an douar,
Uhel eo Doue dreist peb tra.

Meuleudi d'an Aotrou Krist Roue ("Gloria laus" e latin)

Diskan: Gloar hag enor, ha meuleudi deoh, Aotrou Krist, Roue ha Salver,
ho peus klevet ar vugale laouen o kana deoh an Hozanna.

1. Roue Israel oh-c'hwi, euz lignez brudet David,
c'hwi ar Roue benniget, o tond en ano Doue.
 2. Ho meuli 'ra an oll Elez ha sperejou eüruz an neñv,
an dud ivez er bed-mañ, hag an oll grouadurien.
 3. Pobl an Hebreed 'zo eet en arbenn deoh gand bodou palmez;
setu ni bremañ o tigas deoh pedennou, kan ha meuleudi.
 4. Ganto oh bet meulet p'edoh tost d'ho Pasion;
pa zeuom-ni d'ho meuli, emaoñ e gloar ho paradoz.
 5. An dud-se 'zo bet plijet deoh; ra blijjo deoh ive or harantez,
Roue mad, Roue trugarezuz, a gar kement tra 'zo mad.
-

10* Pa dremener an nor da vond en iliz, kemer ar han-mañ, pe unan heñvel:

Da heul ar Zalver o tond e kêr Jeruzalem, emañ bugale an Hebreed
oh embann e tle Mestr ar vuez sevel da veo: * Bodou palmez en o
daouarn, e kanont a bouez penn: Hozanna e barr an neñvou!

V. P'o deus klevet tud ar bobl emañ Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
e kerzont a-benn hent dezañ: * Bodou palmez.....

11* Ar beleg a gerz beteg an aoter hag a bok dezi. Ma vez tro d'hen ober,
e lak ezañs da vogedi, oh ober tro an aoter. Goudeze, ez a d'e gador,
ha dioustu e lavar Pedenn an digor (pe: ar gempedenn) - gwelit n° 21),
o lezel a-gostez peb tra all euz lidou an digor.

B) LID AN ANTRE SOLANEL (e diabarz an iliz)

12* 'Leh n'eus ket tu da ober prosesion en diavêz d'an iliz, e lider donedi-
gez Or Zalver gand an antre solanel en diabarz, evel m'eo merket amañ.

13* Emañ an dud fidel pe dirag an nor vraz, pe en diabarz d'an iliz, bodou
pe skourrou ganto en o daouarn. Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e zervicha,
hag ivez eun toullad tud fidel, a ya (en diavêz d'ar heur) en eul leh
êz awalh evid ma vo gwelet ha klevet gand ar peb muia euz an dud.

14* Al lid, neuze, a zigor evel merket uhellouh, n° 4-7, da lavared eo:
euz kan an digor beteg goude an Aviel. Mond a ra ar beleg neuze, ar
groaz en e raog, a-dreuz an iliz beteg ar heur, tra ma kaner (uhellouh
n° 10): "Da heul ar Zalver o tond...", pe eur han all.

15* Evel an n° 11: ar beleg a zalud an aoter hag a ya d'e gador da lavared
pedenn an digor (izelloh, n° 21).

C) LID AN ANTRE PLËN

16* An dra-mañ 'zo evid an overennou all euz an deiz: evid merka ar zoñj euz
* donedigez Jezuz da Jeruzalem, e reer an antre plên.

17* Tra ma kerz ar beleg etrezeg an aoter, ar bobl a grog gand kan an digor
* (amañ war-lerh, n° 18), pe eur han all gand menozioù heñvel.
* Ar beleg a bign ouz an aoter hag a bok dezi. Mond a ra d'e gador,
* hag éno e ra ar zalud d'ar bobl hag ar peurrest evel boaz.

18* Kan an digor

C'hweh dervez araog gouel ar Pask, p'edo Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
bugale a zo deut en arbenn dezañ, bodou palmez en o daouarn,
hag a bouez penn e kanent: * Hozanna e barr an neñvou! Meuleudi deoh-hwi,
a zo deut gand ho karantez kén braz!

Salm 23/9-10 - (gwelit p. 130)

19* En ilizou na reer enno na prosesion nag antre solanel, e vo mad ober,
en diavêz d'an overenn, ofis ar Gomz santel diwarbenn donedigez Or Zalver
hag e Basion, d'an eur a zigouezo ar gwella, da bardaez ar zadorn pe
d'ar zul.

AN OVERENN

20* Evel m'eo bet lavaret dija, e-leh m'eo bet graet ar brosesion pe an
antre solanel, ar beleg a lavar dioustu Pedenn an digor :

21* PEDENN AN DIGOR. - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, evid diskouez d'an dud penaoz en em
izellaad, c'hwi ho peüs grêt d'Or Zalver diskenn da gemer on natur-dén
ha gouzañv maro ar groaz;
roit deom eta ar hras da gompren kentelioù e Basion, ha da gaoud perz
en e adsao da veo. Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll...

SKRITUR ZAKR EN OVERENN SUL AR BLEUNIOU

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (50/4-7)

*** Servicher Doue, da lavared eo ar
Zalver, a zougo e boaniou gand oll
nerz e galon, sentuz ouz Doue.

4. An Aotrou Doue e-neus roet din teod eun diskibl a zesk mad e gentel,
evid ma vin gouest, dre va homzou, da gonforti ar re 'zo eet skuiz.
Beb mintin e teu d'am dihuni, da zihuni va diskouarn,
din da zelaou evel ma selaou eun diskibl e vestr.
5. An Aotrou Doue e-neus digoret din va skouarn;
me n'am eus ket enebet, n'am eus ket tennet a-dreñv.
6. Va hein am eus troet d'ar re a skoe warnon,
ha va dioujod d'ar re a ziframme va baro;
n'am eus ket dizroet va fas
diouz an dismegañsou hag an taoliou kranñh.
7. An Aotrou Doue eo a zeu d'am zikour:
rag-se ne zantan ket an dismegañsou,
rag-se am eus laket va fas ken kaled hag eur mên,
ha gouzoud a ran n'am-mo ket méz da gaoud.

=====

SALM 21 / 8-9, 17-18a, 19-20, 23-24 - (Ar salm lavaret gand Jezuz war
ar groaz.)

Diskan: Va Doue, va Doue, perag ho peus va dilezet?(gwerzad 2a)

.....

pe ar poz 4 euz "Doue gwir bried" (Kant. n° 41): Pignom, va ene".

8. Oll ar re am gwel a ra goab ahanon, a astenn o muzellou hag a hej o fenn:
9. "Fizioud a ra war an Aotrou, emezo; ra zeuio d'e zilivra!
d'e zavetei, pa blij kement dezañ!

17. En-dro din ez eus eur vandenn chas; gand eur bagad tud fall on kelhiet;
toulla 'reont va daouarn ha va zreid,
- 18a. gouest on da gonta an oll eskern euz va horv.
19. Lodenna 'reont va dillad etrezo; war va mantell e tennont ar zord.
20. Med c'hwi, Aotrou Doue, na jomit ket pell diouzin;
c'hwi, va nerz, deuit buan d'am zikour!
23. Bruda 'rin hoh ano dirag va breudeur;
e kreiz ar bobl e kanin ho meuleudi.
24. C'hwi oll, tud a zoujañs Doue, meulit anezañ;
c'hwi oll, bugale e bobl, roit gloar dezañ.
+++++

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (2/6-11)

*** Pegen izel eo diskennet Mab Doue evid or zavetei,
ha pegen uhel eo savet gand Doue an Tad.

6. Va breudeur, ar Zalver Jezuz, o veza en e stad a Zoue,
n'eus ket fellet dezañ derhel groñs d'ar renk a lak anezañ par da Zoue;
(pe: ne oa ket evitañ eul laeradenn beza par da Zoue)
7. er hontrol (pe: med) diskennet eo ken izel ha netra,
kemeret gantañ ar stad a sklavour (pe: a zervicher),
deut da veza heñvel ouz an dud,
hag anavezet diouz e zoare evel eun dén e-touez ar re all.
8. En em izelleet e-neus, ha sentuez eo bet beteg ar maro,
ar maro war ar groaz zokén.
9. Ablamour da-ze e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an Ano a zo dreist da beb ano.
10. Rag-se, dirag ano Jezuz e tle an oll plega o daoulin
en neñv, war an douar ha dindan an douar,

. /

11. ha peb teod a dle diskleria ez eo Jezuz Krist an Aotrou,
evid gloar Doue an Tad.

+++++

SALUD D'AN AVIEL.- Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Krist!

..... Meuleudi deoh, Salver ar bed!

Y. Evidom-ni eo bet sentuz Or Zalver
beteg ar maro, hag ar maro war ar groaz.
Ablamour da-ze e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an Ano 'zo dreist da beb ano.

+++++

*** NOTADENN.-

1) Evel beb sul, tri bennad Skritur Zakr a zo merket
evid an overenn-mañ, hag ali stard a ro an Iliz da lenn anezo
o zri. Istor ar Basion eo an hini pouezusa, ha ne dle morse beza
lezet a-gostez. Med, diouz ma tigouezo, e hell beza abegou mad
da ober unan hebkén euz an diou lennadenn all, marteze zokén
da lenn ar Basion hebkén.

2) Istor ar Basion a heller diverra, diouz réd, o kemer
hebkén ar pennad 23/1-49.

3) Ma 'z eus tri lenner, lodenn pep hini a zo merket gand
al lizerennou: J. evid komzou Jezuz, A. evid komzou an dud all,
L. evid lod al lenner.

PASION OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (22/14 da 23/56)

Ar Goan diweza
.....

- L. 14. En abardaëvez-se, pa oa deut an eur,
Jezuz a zo eet ouz taol gand an ebestel.
15. Hag e-neus lavaret dezo:
- J. "C'hoant braz am eus bet da zebri ar Pask-mañ ganeoh
araog gouzañv va fasion.
16. Rag, hen lavared a ran deoh, ne zebrin mui anezañ
kén na vo deut da vad e Rouantelez Doue."
- L. 17. Neuze, o veza kemeret eur halirad gwin ha grêt ar bedenn a drugarez,
e-neus lavaret:
- J. "Kemerit, ha lodennit etrezoh,
18. rag, m'hen lavar deoh, ne evin mui euz frouez ar winienn
kén na vo deut Rouantelez Doue."
- L. 19. Hag, o veza kemeret bara ha grêt ar bedenn a drugarez,
e-neus e dorret ha roet dezo, en eur lavared:
- J. "Va horv eo hemañ, an hini roet evidoh.
Grit kement-mañ gand ar zoñj ahanon."
- L. 20. Evelse c'hoaz e ra evid ar halirad goude koan, en eur lavared:
- J. "Bez' eo ar halirad-mañ an emgleo nevez
em gwad, an hini skuillet evidoh.
21. Setu, evelato, emañ dorn an hini am gwerz ganén-me war an daol.
22. Rag Mab an den a zo o vond kuit, evel m'eo merket;
gwaz a ze, avad, d'an hini a werz anezañ."
- L. 23. Hag an Ebestel da glask etrezo piou bennag en o zouez
a oa o vond d'ober kement-se.
24. Tabud a zav ivez etrezo da houzoud piou anezo
a zo da veza kemeret evid ar brasa.
25. Jezuz, avad, a lavar dezo:

- J. "Rouaned ar broadou a ra o mistri warno,
hag ar re a daol pouez o galloud warno a anver madoberourien.
26. Diwallit, c'hwi, da veza evelse.
Er hontrol, ar brasa en ho touez ra 'n em lako par d'an disterra,
hag an hini 'zo e penn par d'ar zervicher.
27. Pehini eo ar brasa, evid gwir, an hini 'zo ouz taol
pe an hini 'zo o servicha?
Daoust ha n'eo ket an hini 'zo ouz taol?
Ha me, koulskoude, a zo en ho touez evel an hini a zervij.
28. C'hwi eo ar re o deus dalhet mad ganén e kreiz va zrubuillou;
29. Ha me a lak ar rouantelez en ho kerz,
evel m'eo bet laket em herz gand va Zad,
30. evid ma vezoh ouz va zaol o tebri hag oh eva em Rouantelez
ha m'ho po troniou d'azeza gand galloud
war an daouzeg meuriad euz pobl Israel.
31. Simon, Simon Per, setu e-neus bet Satan e houlenn
evid ho strilla (pe: ridella - pe: heja)
evel ma vez grêt d'ar gwiniz er hrouer.
32. Med me am eus pedet evidout, evid ma chomo da feiz heb fallaenn.
Ha te, pa vi distroet, dit da harpa da vreudeur."
- L. 33. Per a lavar dezañ:
A. "Aotrou, ganez on prest da vond ha d'ar prizon ha d'ar maro!"
- L. 34. Ha Jezuz en-dro:
J. "M'hen lavar dit, Per, ne gano ket ar hillog hirio
araog m'az po, dre deir gwech, nahet va anaoud."
- L. 35. Hag e lavar dezo:
J. "P'am moa kaset ahanoh heb yalh, na bisah, na boutou,
daoust ha diouer ho peus bet euz eun dra bennag?"
- A. — Seurd ebed, emezo."
- L. 36. Jezuz neuze a lavar dezo:

- J. "Mad! bremañ, d'an neb e-neus eur yalh kemered anezi,
ha kemend all evid ar bisah;
d'an neb n'e-neus ket, gwerza e vantell da brena eur hleze.
37. Rag, hen lavared a ran deoh, bez' e rank dond da wir ennon-me
ar gomz-mañ euz ar Skritur: Lakeet eo bet e renk an dorfetourien.
E gwirionez, ar pezh a zo diwar va fenn
a zo o vond da veza peurechuet."
- L. 38. Hag int-i a lavar dezañ:
A. "Setu daou gleze amañ."
L. Eñ a respont:
J. "Awalh eo!"
2. E liorz an Olivez
- L. 39. O veza eet er-mêz, Jezuz a gerz, evel kustum, da Venez an Olivez;
war e lerh (pe: d'e heul) e teu an diskibien ive.
40. Erruet éno, e lavar dezo:
J. "Pedit, evid na gouezoh ket en tentadur."
- L. 41. Pellaad a ra diouto war hed bann eur mên,
ha war e zaoulin en em lak da bedi evelhénn:
- J. 42. "Tad, ma plij ganeoh, pellait ar halirad-mañ diouzin;
koulskoude, n'eo ket va bolontez din-me,
med hoh hini bezet grêt."
- L. 43. Neuze, e par dirazañ eun êl euz an neñv d'e gennerza.
44. Gwasket gand an anken, e pede startoh;
deut eo e hwezenn da veza evel beradou (pe: takennou) gwad
o tivéra beteg an douar.
45. O veza savet euz e bedenn hag eet daved e ziskibien,
e kav anezo kousket gand samm o glahar (pe: o doan).
46. Hag e lavar dezo:
J. "Perag ez oh kousket? Savit (en ho sav) ha pedit
evid na gouezoh ket en tentadur."

3. Jezuz etre daouarn e enebourien.

- L. 47. Emañ c'hoaz o komz, pa zigouez eur vandennad tud,
hag an hini anvet Judaz, unan euz an daouzeg, a gerz en o 'fenn;
tostaad a ra ouz Jezuz da bokad dezañ.
48. Jezuz a lavar dezañ:
J. "Judaz, gand eur pok eo e werzez Mab an den?"
- L. 49. O weled petra 'zo o vond da hoarvezoud,
ar 'zo en-dro da Jezuz a houlenn outañ:
A. "Aotrou, ha ma skofem a daoliou kleze?"
- L. 50. Hag unan anezo a sko eun taol gand mevel ar beleg meur (pe: braz)
hag a zistag dezañ e skouarn dehou.
51. Med Jezuz a lavar:
J. "Lezit! Awalh evelse!"
- L. Hag, o veza touchet ouz skouarn an den, e lak anezañ pare.
52. Neuze e komz Jezuz ouz ar re a zo deut warnañ:
pennou braz ar veleien, gwardou an Templ ha re goz ar bobl:
J. "Evel d'eul laer ez oh deut gand klezeier ha bizier.
53. Pa vezen bemdez ganeoh en Templ,
n'ho peus ket taolet ho taouarn warnon;
med hoh eur eo houmañ, ha galloud an deñvalijenn eo."

4. Nahadennou Pèr.

- L. 54. Kregi a reont ennañ neuze, e gas ganto, hag e rén da di ar Beleg meur.
Pèr a zeu da heul, a ziabell.
55. Tan o deus grêt e kreiz ar porz, hag azezet int tro-dro,
ha Pèr mond d'azeza en o zouez.
56. Eur vatez a wel anezañ azezet ouz skleur an tan,
ha goude beza sellet mad outañ, e lavar:
A. "Hemañ ivez a oa gantañ."

- L. 57. Med eñ en em lak da naha, en eur lavared:
A. "Maouez, n'anavezan ket anezañ."
- L. 58. Eun nebeud goude, unan all, o veza sellet outañ, a lavar:
A. "Te ivez a zo euz an dud-se!"
- L. Ha Pèr da respont:
A. "Va den, ne d-on ket."
- L. 59. War-dro eun eur diwezatoh, setu unan all c'hoaz
o poueza hag o poueza da lavared:
A. "Difazi eo! (pe: re wir eo) hemañ ivez a oa gantañ;
ha neuze, Galilead eo."
- L. 60. Respont a ra Pèr:
A. "Va den, n'ouzon ket petra emhout o lavared."
- L. Kerkent, ha Pèr c'hoaz o komz, e stag ar hillog da gana.
61. An Aotrou, o veza troet ouz Pèr, a bar e zell warnañ,
hag e teu sonj da Bèr euz komzou an Aotrou o lavared:
Araog m'e-no ar hillog kanet hirio,
ez po, dre deir gwech, nahet va anaoud.
62. Mond a ra Pèr er-mêz, ha skuill daelou c'hwero.
63. Hogen, ar wazed a oa o tiwall Jezuz a ree goab anezañ
hag a skoe gantañ.
64. Mouñcha a reent e benn ha goulenn outañ:
A. "C'hoari da brofed! Piou e-neus skoet ganez?"
65. Ha gwall-gomzou all e-leiz a zistagent a-eneb dezañ.

5. Jezuz dirag Kuzul-Meur ar Juzevien.

- L. 66. Deut an deiz, ez eo en em vodet re goz ar bobl, ar veleien vraz
hag ar skribed; grêt o deus digas Jezuz dirag o Huzul-Meur,
67. hag e lavaront dezañ:
A. "Ma 'z oh-c'hwil ar Mesiaz, lavarit deom."
- L. Eñ a respont dezo:

J. 68. "Ma lavaran ya deoh, ne gredoh ket,
ha ma ran goulennou ouzoh, ne respontoh ket.

69. Med diwar vremañ e vo Mab an den
azezet en tu dehou da Zoue oll-halloudeg."

L. 70. Oll e lavaront neuze:

A. "C'hwi eta a zo Mab Doue? (pe: Mab Doue oh-c'hwi neuze?)

L. Jezuz a respont:

J. "C'hwi hen lavar, bez' ez on."

L. 71. Neuze e lavaront:

A. "Peseurd ezomm on eus c'hoaz a destou?

Ni on-unan on eus klevet diwar e vuzellou."

6. Jezuz dirag Pilat.

L. 23/1. Oll a-unan, tud ar Huzul a zo savet neuze
hag o deus kaset Jezuz da di Pilat, ar gouarnour.

2. E damall a reont en doare-mañ:

A. "Kavet on eus hemañ o poulza or pobl d'an dizurz,
o tivenn paea an taillou (pe: gwiriou) d'an impalaer,
hag o tiskleria ez eo ar Mesiaz-Roue."

L. 3. Pilat a houlenn ouz Jezuz:

A. "Ha te a zo Roue ar Juzevien?"

L. Respont a ra Jezuz:

J. "C'hwi hen lavar."

L. 4. Pilat a dro ouz ar veleien vraz hag ouz ar bobl, hag a lavar dezo:

A. "Ne gavan abeg ebed da gondaoni an den-mañ."

L. 5. Med int-i a bourchue muioh-mui:

A. "Dougen a ra ar bobl d'en em zével,
o prezeg dre vro ar Juzevien a-bez,
azaleg Bro-Halilea beteg amañ."

7. Jezuz dirag Herodez.

L. 6. Pilat, p'e-neus klevet ano euz Bro-Halilea,
a houlenn ha Galilead eo an den.

7. O veza gouezet ez eo euz galloud Herodez,
e kas anezañ da di Herodez, a'n em gav ivez e Jeruzalem
d'an deiziou-se.

8. Herodez, o weled Jezuz, a zo laouen braz,
rag, abaoe pell amzer, e-noa c'hoant d'e weled,
en askont (pe: ablamour) d'ar pezh a gleve diwar e benn;
ha fizians e-neus d'e weled oh ober eur burzud bennag.

9. Goulennou a ra outañ stank ha stank,
med Jezuz ne respont dezañ gér ebed.

10. E keit-se, ar veleien vraz hag ar skribed a zo éno
a ra beh (pe: a boagn) da zével tamallou outañ.

11. Herodez hag e wardou a daol dismegans warnañ, a ra goab anezañ
hag a wisk dezañ eur zae liou splann;
a-benn ar fin, e kas anezañ en-dro da di Pilat.

12. Herodez ha Pilat, hag i enebourien beteg neuze,
a zeu da veza mignoned d'an deiz-se.

8. Jezuz kondaonet d'ar maro.

13. Pilat, neuze, a halv dirazañ ar veleien vraz, ar renerien hag ar bobl,
14. hag a lavar dezo:

A. "Digaset ho peus din an den-mañ
evel unan hag a boulz ar bobl d'an dizurz;
ha setu me, goude beza grêt enklask warnañ dirazoh,
n'am eus kavet abeg ebed d'e gondaoni
diwar an tamallou a rit dezañ.

15. Nag Herodez kennebeud, rag digaset e-neus anezañ deom en-dro;
setu eta n'eus netra a gement e-neus grêt hag a verit ar maro.

16. Rag-se, ez an da lakaad e gastiza, hag e roin dezañ e frankiz."

L. 18 Med, oll a-unan, en em lakont da grial:

A. "Lakit hemañ d'ar maro, ha roit deom Barabbaz!"

L. 19. Ablamour d'eun taol dispah savet e kêr ha d'eur muntr (pe: laz eun den)
e oa bet hennez taolet er prizon (pe: en toull-bah).

20. Eur wech all eo staget Pilat da gomz outo,
c'hoant dezañ da rei e frankiz da Jezuz.

21. Med i da youhal:

A. "Ouz ar groaz! ouz ar groaz!"

L. 22. Evid an deirved gwech e lavar Pilat dezo:

A. "Peseurd droug 'ta e-neus grêt?

N'am eus kavet ennañ netra hag a veritfe ar maro;
rag-se, goude beza e gastizet, e roin dezañ e frankiz."

L. 23. Med ind a bourchue da houlenn a bouez penn
ma vefe staget ouz ar groaz,
ha kreñvoh-kreñva e save o moueziou.

24. Neuze Pilat e-neus douget e zetans: rei dezo o goulenn.

25. Laosket e-neus ganto an hini a oa bet taolet er prizon
evid eun taol dispah hag eur muntr (pe: laz eun den),
pegwir e houlennent hennez;
ha laket e-neus Jezuz etre o daouarn,
evid ober dezañ hervez o youl (pe: bolontez).

9. War hent Menez Kalvar.

L. 26. P'edont o kas anezañ ganto, o deus paket eun den anvet Simon,
euz Bro-Guren, a oa o tond d'ar gêr euz ar park,
hag e laket o deus da zougen ar groaz war-lerh Jezuz.

27. Ouz e heul e oa eur boblad vraz a dud, merhed ive,
o skei war boull o halon hag o hirvoudi war e goust.

28. O veza dizroet warzu enno, Jezuz a lavar:

J. "Merhed Jeruzalem, na ouelit ket warnon-me,
gouelit kentoh warnoh hoh-unan ha war ho pugale.

29. Rag dond a ra deizioù ma vo lavaret: Eüruz ar gwragez difrouez,
ar re n'o deus ket ganet bugale hag ar re n'o deus ket maget.

30. Neuze e lavaro an dud d'ar menezioù: Kouezit warnom,
ha d'an torgennou: Goloit ahanom.

31. Rag, ma vez grêt kement-mañ d'ar hoad glaz,
petra ne vo ket grêt d'ar hoad seh?"

10. Jezuz war ar groaz

L. 32. Bez' e oa daou zen all, torfetourien anezo,
kaset asamblez gand Jezuz, evid beza laket d'ar maro.

33. Eur wech erruet el leh anvet ar Halvar,
o deus staget Jezuz ouz ar groaz, hag an dorfetourien ivez,
unan en tu dehou, egile en tu kleiz.

34. Edo Jezuz o lavared:

J. "Tad, pardonit dezo, rag ne ouzont ket petra emaint oh ober."

L. Neuze e lodennont e zillad hag e tennont anezo d'ar zord.

35. Ar bobl a jome éno da zelled (pe: da arvesti);
renerien ar bobl, int, a ree goab anezañ, en eur lavared:

A. "Saveteet e-neus re all, dezañ d'en em zavetei e-unan,
mar deo Mesiaz Doue, an hini dibabet gantañ."

L. 36. Ar zoudarded ivez a ree goab anezañ;
tostaad a reent, ha kinnig gwin treñk dezañ, en eur lavared:

A. 37. "Mar dout-te roue ar Juzevien, en em zavete da-unan!"

L. 38. Bez' e oa c'hoaz, a-zioh e benn, eur skritell
gand ar gerioù-mañ e gregaj, latineg hag hebreeg:
Roue ar Juzevien eo hemañ.

39. Unan euz an dorfetourien laket e kroaz a wallgomze outañ:

- A. "Ha n'out-te ket ar Mesiaz? En em zavete da-unan, ha ni ivez!"
- L. 40. Mad an torfetour all a ree rebech dezañ:
- A. "N'az peus ket doujans ouz Doue zokén,
ha te barnet d'ar memez kastiz?
41. Evidom-ni ez eo just, rag priz on oberou a resevom;
med hemañ n'e-neus grêt droug ebed."
- L. 42. Hag e lavare:
- A. "Jezuz, ho pet sonj ahanon, pa vezoh erruet en ho rouantelez."
- L. 43. Ha Jezuz dezañ:
- J. "E gwirionez, m'hen lavar dit,
hirio e vezi ganén er baradoz."
- L. 44. War-dro kreisteiz e oa, pa 'z eus kouezet teñvalijenn
war an douar a-béz, beteg teir eur,
gand eur fallaenn war an heol.
45. Ha gouel an Templ a zo roget dre an hanter.
11. Maro Jezuz.
.....
- L. 46. E vouez savet uhel, Jezuz e-neus lavaret:
- J. "Tad, etre ho taouarn e lakan va ene."
- L. ha goude ar homzou-se, e-neus laosket e huanad diweza.
(Amañ ez eer war an daoulin.)
47. O weled ar pezh a oa c'hoarvezet, ar hantener (pe: an ofiser)
e-neus rentet gloar da Zoue, en eur lavared:
- A. "E gwirionez, an den-mañ a oa just (pe: mignon da Zoue).
- L. 48. Hag an oll dud a oa en em vodet éno da zelled,
goude beza gwelet ar pezh a oa digouezet,
a zistroe en eur skei war boull o halon (pe: war o feultrin).
49. Oll vignoned Jezuz a jome a ziabell,
ha bez' e oa ive ar merhed a oa bet ouz e heul azaleg Bro-Halilea,
o sellet ouz kement-se.

12. Jezuz laket er béz.
.....

- L. 50. Ha setu o tond eun den anvet Jozef,
unan euz ar Huzul-meur, den mad ha just;
51. ne oa ket bet a du gand mennadou na gand oberou ar re all;
bez' e oa euz kêr Arimazea (pe: Arimati), e Bro-Juda,
hag eñ ivez a oa o hortoz rouantelez Doue.
52. Eet eo da gaoud Pilat, da houlenn korv Jezuz.
53. Hen diskenn a ra euz ar groaz, hag e baka en eul liñsel,
ha goudeze e lak anezañ en eur béz kleuzet er roh,
ha ne oa bet laket den ennañ c'hoaz.
54. Ar gwener e oa (pe: derhent ar zabad e oa),
ha dija e weled o skedi gouleier ar zabad.
55. O veza heuliet ar horv, ar merhed deut gantañ euz Bro-Halilea
o deus sellet mad penaoz emañ ar béz
ha penaoz eo bet laket ar horv ennañ.
56. Distroet int e kêr, evid aoza (pe: pourchas) louzeier c'hwez-vad;
ha da zeiz ar zabad ez int chomet e peoh, hervez al lezenn.

PEDENN AN DIGOR.- (Gwelit e traoñ ar bajenn 133, n° 21)

WAR AR PROVOU -

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, dre Basion ho Mab karet,
ma teuio beteg ennom ho pardon madelezuz;
daoust ma ne veritom ket anezañ dre on oberou,
grit deom e reseo digand ho trugarez
dre vertuz ar zakrifis n'eus nemetañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

PREFAS - Unan euz re al Levr-overenn aoter, p. 45, pe hemañ
troet diwar ar "Missale Romanum" 1970:

E gwirionez... dre Jezuz Krist, or Zalver.
Eñ a zo fellet dezañ, dibeh ma oa, gouzañv evid ar beherien,
ha beza kondaonet, heb beza grêt netra 'fall,
evid ar re o doa grêt an droug;

E varo e-neus gwalhet or pehejou,
hag e adsao da veo e-neus roet deom a-nevez buez ar hras.
Drezañ emañ an neñv hag an douar, an êlez hag an arhêlez,
oh embann deoh meuleudi hag enor, heb skuiza morse o lavared:

GOUDE KOMUNIA.-

Maget gand ar zakramant santel, ni ho ped stard, Aotrou Doue:
dre varo ho Mab ho peus roet deom an esperans da gaoud
ar pez na welom ket hag a anavezom dre ar feiz;*
grit deom, drezañ adsavet da veo,
mond beteg an termen eüruz a glaskom.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (10/34a, 37-43)

Lennadenn Ia.- Evid prezeg ar feiz, an Ebestel a boueze dalh-
mad war adsao Jezuz Krist a varo da veo; evel ma lavar sant
Pèr amañ, bez' e oant testou a gement-se.

- E ti eun ofiser euz armæ Rom, e-neus e halvet da zond,
34. Pèr a gomz evelhenn:
37. "Anaoud a rit-c'hwi an traoù 'zo bet c'hoarvezet e bro ar Juzevien a-béz,
ha da genta e Bro-Halilea, goude ar vadiziant a brezege Yann;
38. Jezuz a Nazared, gouzoud a rit penaoz e-neus Doue sakret anezañ
dre ar Spered Santel ha karget anezañ a halloud;
tremen e-neus grêt oh ober vad, hag o rei ar pare
da gement hini a oa gwasket gand an droug-spered,
rag Doue a oa gantañ.
39. Ha ni, an Ebestel, a zo testou war an oll draou e-neus grêt
e bro ar Juzevien hag e kêr Jeruzalem,
eñ an hini o deus laket d'ar maro, o staga anezañ ouz koad eur groaz;
40. eñ ivez an hini e-neus Doue dazorhet (pe: savet da veo)d'an trede deiz,
ha grêt dezañ en em ziskouez
41. n'eo ket d'ar bobl a-béz, med d'an testou dibabet a-viskoaz gand Doue,
deom-ni, hag a zo bet o tebri hag oh eva gantañ
goude m'eo bet savet a-douez ar re varo.
42. Ha deom e-neus roet ar garg da embann ar helou d'ar bobl
ha da rei testeni ez eo eñ an hini laket gand Doue
da varner ar re veo hag ar re varo.
43. Dezañ eo e ro an oll Brofeted an testeni-mañ:
ar pardon euz e behejou a resev drezañ
kement hini a lak e feiz ennañ."

+++++

SALM 117 / 1-2, 16-17, 22-23. - En deiz-mañ grêf gand an Aotrou Doue,
tridom gand levenez. Alleluia!

1. Lavarit mil bennoz da Zoue, ablamour ma 'z eo mad:
da viken e pado e vadelez.
2. Lavarit 'ta, pobl Israel: da viken e pado e vadelez.

16. Dorn Doue e-neus grêf traou kaer;
dorn Doue e-neus va laketa em zao.

17. Ne varvin ket, beva a rin, ha bruda 'rin oberou Doue.

22. Ar mên taolet kuit gand saverien an ti a zo grêf anezañ ar mên-korn.
23. Gand Doue eo bet grêf kement-se: eur burzud eo dirag on daoulagad.

+++++

*** Da eil lennadenn e kemerer unan euz an diou-mañ:

a) PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GOLOS (3/1-4)

*-- Kentel verr, frouezuz kenañ: dre vertuz Pask Or Zalver,
peb kristen a zo unan gantañ, lodeg en e vuez nevez.

1. Va breudeur, savet oh da veo a-unan gand Or Zalver;
klaskit eta madou an neñv,
'leh m'emañ Or Zalver azezet en tu deou da Zoue.
2. Lakit ho sonj e traou an neñv, ha n'eo ket e re an douar.
3. Rag a-unan gand Or Zalver ez oh bet marvet,
hag ho puez gantañ a zo eun dra guzet e Doue;
4. Med, pa baro Or Zalver er splannder, eñ or buez,
neuze c'hwi ivez a baro gantañ e-kreiz ar hloar.

b) PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (5/6-8)

*-- Intentom mad ar pennadig-mañ: ar goell laketa en toaz
a zo sin (pe: arouez) euz breinadurez an techou fall;
beza dihoell a zo beza nêf a behed.

6. Va breudeur, c'hwi 'oar mad ez eo eun nebeudig goell
a lak an toaz en e bêz da hoñ.
7. Taolit kuit ahanoh ar goell koz,
deoh da veza toaz fresk, pegwir n'eus ket goell ennoh.
Rag laketa eo bet d'ar maro on Oan Pask, an Aotrou Krist.
8. Ablamour da-ze, greom fêst,
nann gand goell koz, goell brein an droug hag ar pehed,
med gand baraennou dihoell, nêf a beb loustoni ha leun a wirionez.

GWERZ "Victimae paschali" - (Nota.- Gwerzadou 4 + 6; ton da zevel;
diskan: Alleluia! Or Zalver a zo beo!)

1. Da Oan or Pask roet e sakrifis
Kinnigom-ni meuleudi, kristenien. - Alleluia! Or Zalver a zo beo!
2. An Oan e-neus dasprenet an deñved: ** Pe (berroh ha startoh, eil gwerzad)
Jezuz, dibeh, evid ar beherien Maro, dibeh, evid ar beherien.
A skuill e wad, priz ar peoh gand e Dad.
3. Krogad estlamm 'tre maro ha buez: ** Pe, e-leh eil ha 3e gwerzad:
Mestr ar vuez, goude m'eo bet maro, Mestr ar vuez, maro, 'zo beo
'Zo beo en-dro, Roue leun a splannder. en-dro.

4. Lavarit deom, c'hwi, Mari Madalen,
Petra ken kaer ho peus gwelet en hent?
— Gwelet am eus béz goullo ar Zalver
Ha gloar Jezuz distroet d'ar vuez.
5. Gwelet am eus daou êl, testou dezañ,
Liñsel ar Mestr hag an dillad er béz.
Adsavet eo Jezuz, va esperañs,
E Galilê e vo ouz ho kortoz."
6. Ni 'oar ervad eo savet Or Zalver
Leun a vuez a-douez ar re varo!
C'hwi, or Roue, bremañ treh d'ar maro,
Ho pet truez ouzom-ni da viken. - Amen.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Da Oan Pask 'vidom-ni eo bet lazet Jezuz Krist.
Deom gand levenez ouz taol Or Zalver. -

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (20/1-9)

1. Antronoz ar zabad goude maro Jezuz,
Mari Madalen a ya d'ar béz mintin mad, pa 'z eo teñval c'hoaz;
gweled a ra ar mên lamet kuit diwar ar béz.
2. Distrei a ra d'ar red da gaoud Simon Pèr hag an diskibl all,
an hini 'oa karet gand Jezuz, hag e lavar dezo:
"Lamet (pe: tennet) eo bet an Aotrou euz ar béz,
ha n'ouzom ket e peleh o deus e laket."
3. Ha setu Pèr hag an diskibl all er-mêz euz an ti, o vond d'ar béz.
4. Redeg a reont o daou asamblez, med an diskibl all a red buannoh
hag a hounez war Bèr: erruet eo ar henta e-tal ar béz.

5. En eur stoui da zelled, e wel al lurennou ledet war an douar,
med chom a ra heb mond tre.
6. Simon Pèr a zigouez ive war e lerh, hag a ya e-barz ar béz;
gweled a ra al lurennou war an douar,
7. hag ivez al lienenn a oa war benn Jezuz,
med houmañ, e-leh beza gand al lurennou,
a zo en eul leh a-gostez, rollet brao.
8. Neuze, d'e dro, ez a en diabarz an diskibl, deut ar henta 'tal ar béz:
gweled a ra, ha kredi a ra.
9. Rag beteg-hénn ne gomprenent ket ar pezh 'zo merket er Skritur Zakr:
e tle ar Zalver sevel beo a-douez ar re varo.

***** AVIEL ALL: Er bloavez C, e heller ivez kemer Aviel
an Noz Fask, amañ war-lerh:

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (24/1-12)

1. Deiz kenta ar zizun, abred diouz ar mintin,
ar merhed a zo deut d'ar béz, ganto al louzou c'hwez-vad o doa aozet,
2. hag o deus kavet ar mên ruillet a-zirag dor ar béz.
3. Eet e-barz, n'o deus ket kavet korv an Aotrou Jezuz.
4. Epad ma choment nehet gand kement-se,
setu daou zen deut da bara en o hichen, lugernuz o gwiskamant.
5. Kroget aon enno, hag o 'fenn stouet warzu an douar,
e klevont an daou-se o lavared dezo:
"Perag e klaskit an hini beo e-touez ar re varo?"
6. N'emañ ket amañ, savet eo da veo;
ho pet soñj penaoz e komze ouzoh p'edo c'hoaz e Bro-Halilea,
7. o lavared e tlee Mab an den bea laket etre daouarn ar beherien,
beza staget ouz ar groaz, ha sevel beo d'an trede deiz."
8. Evid gwir, deut eo sonj dezo euz e gomzou.

9. Distroet euz ar béz, o deus roet kelou euz kement-se
d'an unneg abostol ha d'an oll ziskibien all.
10. Bez' e oa anezo Mari Madalen, Joanna (pe: Chann) ha Mari mamm Jakez;
hag ar re all euz o hompagnunez a lavare ivez
ar memez tra d'an ebestel.
11. Med evid ar re-mañ, ne oa seurd komzou nemed sorhennou,
ha n'o deus ket kredet ar merhed.
12. Pèr, koulskoude, a zo savet hag eet d'ar red beteg ar béz;
en eur stoui e benn da zelled, e-neus gwelet
al lurennou laket en o 'fart o-unan war an douar;
hag eet eo kuit, souezet ennañ e-unan
gand ar pezh a oa c'hoarvezet.

***** Pa lavarer overenn ar zul Fask diouz an abardaez, e heller
***** lenn eun Aviel all c'hoaz, a lakom amañ da heul:

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (24/13-35)

13. En deiz-se, an trede goude maro Jezuz,
setu daou euz e ziskibien oh ober hent warzu eur gêriadenn
anvet Emmaouez, a zo war-dro div eur bale diouz Jeruzalem.
14. Ha kaoz a oa ganto euz an oll draou a oa bet c'hoarvezet.
15. E-kreiz o divizou, pa lavarent o zonzou an eil d'egile,
Jezuz e-unan a zo deut en o hichen hag a ree hent ganto.
16. Med o daoulagad ne oant ket evid e anaoud.
17. Eñ a lavar dezo: "Peseurd divizou ho peus etrezoh en eur vale?"
Chom a reont a-zav, teñval o 'fenn.
18. Hag unan anezo, Kleopaz e ano, a respont dezañ
"N'eus nemedoh diavêzour e Jeruzalem o veza heb gouzoud
an traou c'hoarvezet e kêr en deiziou-mañ?"
19. Goulenn a ra outo: "Peseurd traou?"

- Hag int da respont: "Diwarbenn Jezuz a Nazared:
hennez a zo bet eur profed braz e halloud
en e oberou hag en e gomzou, dirag Doue ha dirag ar bobl a-bez;
20. med an arhveleien (pe: ar veleien vraz) ha renerien or pobl
o deus roet anezañ d'ar gouarnour
evid ma vije kondaonet d'ar maro ha staget ouz ar groaz.
21. Ni, koulskoude, on-noa esperañs e oa-eñ o vond da zavetei Israel.
Ha gand kement-se, emañ bremañ an trede dervez
abaoe m'eo be c'hoarvezet an traou.
 22. Gwir eo ez eus merhed euz or re-ni hag o deus laket ahanom nehet:
eet int, mintin mad, d'ar béz,
 23. n'o deus ket kavet e gorr, ha deut int en-dro;
lavared a reont zokén o deus gwelet êlez
ha klevet ganto emañ e buez.
 24. Neuze, unan bennag euz or re-ni a zo eet beteg ar béz,
ha kavet o deus peb tra evel ma lavare ar merhed,
nemed eñ n'o deus ket gwelet anezañ."
 25. Lavared a ra Jezuz dezo: "O tud berr a spered ha pell o kredi
kement o deus lavaret ar brofeted!
 26. Daoust ha ne ranke ket ar Mesiaz gouzañv ar poaniou-se
evid antreal en e hloar?"
 27. Neuze, o kemer Moizez da genta, ha goudeze an oll brofeted,
e tispieg dezo, en oll Skrituriou, ar pezh a zo diwar e benn.
 28. Dond a reont evelse da gichen ar gêriadenn ma 'z eent,
hag eñ a ra an neuz (pe: a ra van) da gerzed pelloh.
 29. Med int a bourchu warnañ, en eur lavared:
"Chomit ganeom, rag deut eo an abardaez,
hag an deiz a zo dija war e ziskar."
- Hag ez a en ti evid chom ganto.

30. Ha setu, epad m'edo ouz taol ganto,
o veza kemeret bara, e-neus lavaret ar vennoz,
hag o veza e dorret, e-neus roet dezo.
31. Neuze e tigor o daoulagad hag eh anavezont Jezuz,
hag eñ a ya kuit diwar o gwel.
32. Hag e lavaront an eil d'egile:
"Ha n'eo ket gwir edo or halon o virvi ennom
epad ma komze ouzom en hent ha ma tisplege deom ar Skrituriou?"
33. Sevel a reont raktal, ha distrei da Jeruzalem;
éno e kavont bodet an unneg abostol hag ar re 'oa ganto,
34. hag o hlevont o lavared: "Gwir mad eo (pe: Heb douetans ebed),
dazorhet eo an Aotrou (pe: savet eo an Aotrou da veo)
hag en em ziskouezet eo da Zimon."
35. Hag an daou ziskibl, d'o zro, a gont petra 'zo digouezet war an hent
ha penaoz o deus e anavezet p'e-neus torret ar bara.
(pe: diouz torr ar bara)

OREZONOU evid Overenn ar ZUL FASK

PEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

En deiz-mañ, Aotrou Doue, dre ho Mab treh d'ar maro,
ho peus digoret deom an nor d'ar vuez peurbaduz:*
ho pedi a reom, ni hag a ra gouel Or Zalver adsavet da veo,
ma teuo ho Spered d'ober ahanom tud nevez
ha ma savim da veo en-dro e sklêrded ar gwir vuez.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue ...

WAR AR PROVOU.-

Aotrou Doue, or halon o tridal gand levenez ar Pask,
e kinnigom deoh ar zakrifis-mañ,
e-neus ar vertuz dispar da nevez ha da vaga buez hoh Iliz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

PREFAS - (* Hini al Levr-overenn aoter, p. 46, a zo kemmet eun tammig
evid heulia ar "Missale Romanum" 1970.)

E gwirionez, just ha santel eo
embann ho meuleudi, Aotrou Doue, e peb amzer,
med muioh eged biskoaz en nozvez-mañ (pe: en deiz-mañ),
goude m'e-neus an Aotrou Krist, on Oan Pask, roet e vuez evidom.
Ya, bez' eo Jezuz an Oan gwirion e-neus dilamet pehed ar bed,
e neus, o vervel, distrujet ar maro,
hag o sevel da veo, roet deom buez nevez.

Setu perag, e-kreiz levenez ar Pask skuillet e peb leh,
emañ war an douar pobl an dud vadezet o tridal,
epad m'emañ en neñv, an élez hag an oll sperejou eüruz
o kana meuleudi d'ho kloar, heb ehan ha da viken:

GOUDE KOMUNIA.- Pedom asamblez...

Diwallit hoh Iliz, Aotrou Doue, gand ho madelez ha ne da skuiz morse:
nevezet he buez gand sakramañchou ar Pask,
grit dezi mond beteg splannder an adsao da veo.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

PREFASOU ALL evid an AMZER FASK

*** Peder destenn nevez a zo e Levr-Overenn Rom 1970; oll e tigoront hag eh echuont evel hini ar Zul Fask:

E gwirionez, just ha santel eo embann ho meuleudi, Aotrou Doue, e peb amzer, med muioh eged biskoaz en amzer-mañ, goude m'e-neus an Aotrou Krist, on Oan Pask, roet e vuez evidom.....

Setu perag, e-kreiz levenez ar Pask skuillet e peb leh, emañ war an douar pobl an dud vadezet o tridal, hag en neñv emañ an êlez hag an oll sperejou eüruz o kana meuleudi d'ho kloar, heb ehan ha da viken:

I) Drezañ e teu d'ar vuez bugale deoh, bugale ar sklerijenn evid ar vuez peurbaduz, ha d'ar re o deus ar feiz e tigor a-nevez doriou rouantelez an neñv; Rag e varo-eñ a zo bet priz on dilivrans diouz ar maro, hag en e adsao da veo ez eo adsavet buez an oll dud.

I) Eñ ha n'ehan ket d'en em ginnig evidom, hag a zo bepred en ho kichen oh alvokadi d'on divenn. Roet d'ar maro e sakrifis, eñ ne varv mui, med da viken e chom beo gand gouliou e varo en e gorv santel.

V) Rag, bremañ p'eo bet distrujet koz traou ar pehed hag ar maro, an oll dud, kouezet ken izel, a zeu da veza krouadurien nevez, hag en Aotrou Krist e kavom en-dro ar vuez leun-barr.

) Dre ar zakrifis euz e gorv war ar groaz, e-neus, e gwirionez, douget d'o zermen diweza sakrifisou an amzer goz (pe: a wechall); hag, o lakaad e vuez etre ho taouarn evid or zilvidigez, ez eo bet war-eun-dro ar beleg, an aoter hag an oan.

TESTENN LATIN AR PREFASOU evid AN AMZER FASK

II) Per quem in aeternam vitam filii lucis oriuntur, et fidelibus regni caelestis atria reserantur. Quia mors nostra est ejus morte redempta, et in ipsius resurrectione vita omnium resurrexit.

III) Qui se pro nobis offerre non desinit, nosque apud te perenni advocacione defendit; Qui immolatus jam non moritur, sed semper vivit occisus.

IV) Quia, vetustate destructa, renovantur universa dejecta, et vitae nobis in Christo reparatur integritas.

V) Qui, oblatione corporis sui, antiqua sacrificia in crucis veritate perfecit, et seipsum tibi pro nostra salute commendans, idem sacerdos, altare et agnum exhibuit.

*** Notadennou troidigez

II - Linenn 1a: trei gér evid gér "filii lucis", heb netra muioh, a rofe deom: "bugale ar sklerijenn", pe "a sklerijenn", med piou a intento?

III - Linenn diweza: ken berr hag al latin n'heller ket ober! Hag an daou hér "immolatus - occisus" a zeblant beza dem-heñvel o stér; med evid an eil anezo, on eus sellet ouz Diskuliadur sant Yann (azaleg V/6).

V) Ar "vetustas" n'eo nemed stad an den sujet d'ar pehed ha d'ar maro, ar pezh a zo anvet "vetus homo" gand sant Paol (cf. geriaduriou Blaise). Hag an "universa dejecta", daoust m'eo neb-reiz (= neutre) e latin, a dalv evid gouenn an dud a-bez.

V) Linenn 1a: heb kemma ar menozioù, on eus kemmet urz ar gérioù. Linenn diweza: "oan ar zakrifis", daoust ha ne vefe ket ar gér a vank deom aliez evid trei "victima" pe "hostia"?

EIL SUL AR PASK / (Sul ar Hasimodo) - 21 a viz Ebrel 1971 -

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (5/12-16)

*** Ar burzudou (pe: miraklou) a zo bet stank en amzer genta an Iliz: bez' e oant sinou da ziskouez gwirionez an Aviel. Ha ni, sonjom er zinou a hellom rei d'an dud da ziskouez dezo ar memez gwirionez.

12. En deiziou-se, e kêr Jeruzalem,
e oa stank ar zinou hag ar burzudou (pe: miraklou)
grêt e-touez ar bobl dre zaouarn an Ebestel.
Hag oll en em gave ar re a grede (pe: o doa feiz) e Jezuz,
unanet a galon, dindan porched Salomon.
13. Nikun euz ar re all ne grede mond en zouez,
ha koulskoude ne ree ar bobl nemed meuleudi dezo.
14. N'ehane ket da greski niver ar wazed hag ar merhed
a grede en Aotrou,
15. kement ha kement ma tigase an dud o re glañv er-mêz euz o ziez,
war ar plasennou, lakeet war gweleou ha kravazou (pe: krivizier);
evelse, pa zeufe Pêr da dremen,
ez afe e skeud, ha pa ne vefe kén, war hini pe hini anezo.
16. Diredeg a ree zokén eur bern tud euz ar hêriou tro-war-dro da Jeruzalem,
o tigas tud klañv pe gwallgaset gand sperejou fall,
hag oll e kavent ar pare.

SALM 117 / 2 & 4, 22 & 24, 25 & 27a - Diskan kinniget (ton "O filii")

Lavarit bennoz da Zoue,
Ken mad ha trugarezuz eo,
N'eus fin ebed d'e vadelez, Alleluia!

2. Lavarit 'ta, pobl Israel: n'eus fin ebed d'e vadelez.
4. Lavarit, c'hwi, servicherien Doue: n'eus fin ebed d'e vadelez.
22. Ar mên taolet kuit gand saverien an ti, setu grêt anezañ ar mên-korn.
24. Hemañ eo an dervez braz grêt gand an Aotrou:
lammom ha tridom gand al levenez.
25. Aotrou, ni ho ped, digasit ar zilvidigez;
ya! Aotrou, digasit an eürusted.
- 27a Ar gwir Doue eo an Aotrou, hag e sklerijenn a bar warnom.
(pe: hag or sklerijenn eo.)

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (1/9-11a, 12-13, 17-19)

*** A-dreuz ar pezh a ziskouez d'ar gristenien, darn anezo laoskeet o feiz dija, sant Yann a 'fell dezañ dihuna ha kennerza ar feiz-se. Amañ e tiskouez ar Zalver beo da viken.

9. Me, Yann, breur deoh ha kenseurd (pe: lodeg) ganeoh
en drubuill, er rouantelez hag er basianted ablamour da Jezuz,
en em gaoud a reen en enezenn anvet Patmoz
abl原因 da gomz Doue ha d'an testeni roet da Jezuz.
10. Savet on bet a spered - deiz an Aotrou, ar zul, e oa - ha klevet am eus
a-dreñv din eur vouez kreñv evel son eun drompill.
11. Lavared a ree: "Skriv war al levr ar pezh a welez,
ha kas anezañ d'ar seiz Iliz a zo e Bro-Azia."

12. Trei am eus grêt da weled piou a gomze ouzin,
hag am eus gwelet seiz kantolor aour,
13. hag, e-kreiz ar hantoloriou, unan heñvel ouz eur Mab-dén,
dezañ eur wiskamant hir beteg e dreid,
hag en-dro d'e gorr, war e vruched eur gouriz aour.
17. Ouz e weled, on kouezet e-harz e dreid, evel maro;
hag eñ e-neus laket e zorn dehou warnon, en eur lavared:
"Na gemer ket aon! Me 'zo ahanon ar Henta hag an Diweza,
18. an Hini Beo; marvet on bet, ha setu emañ e buez da virviken,
ha ganin emañ an alhoueziou war ar maro ha bro an anaon.
19. Skriv eta ar pezh az po gwelet: ar pezh a erru bremañ
hag ar pezh a dle erruoud goudeze."

ALUD D'AN AVIEL - Alleluia! Ouz va gweled, Tomaz, az peus kredet;
Eüruz neb a gred heb beza gwelet.

ENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (20/19-31)

0. Da zeiz kenta ar zizun goude maro Jezuz, diouz an abardaez,
an noriou 'zo bet prenet war al leh m'emañ an diskibien,
dre aon rag ar Juzevien. Dond a ra Jezuz,
ha setu eñ en o zouez: "Ar peoh ra vo ganeoh!" emezañ.
0. Goude ar gomz-se, e tiskouez dezo e zaouarn hag e gostez.
Laouen braz eo an diskibien o weled an Aotrou.
0. Jezuz a lavar dezo a-nevez: "Ar peoh ra vo ganeoh!
Evel m'e-neus va Zad kaset ahanon, me ho kas d'am zro."
0. Goude ar homzou-se, e c'houez warno, en eur lavared:
"Resevit ar Spered Santel:
0. d'ar re ho po pardonet dezo o 'fehejou, e vezint pardonet,
ha d'ar re ho po o dalhet outo, e vezint dalhet."

24. Bez' e oa unan euz an Daouzeg, Tomaz, an hini anvet ar Gevell,
ha ne oa ket ganto pa oa deut Jezuz.
25. An diskibien all a lavar dezañ: "Gwelet on eus an Aotrou!"
Med eñ a zistag outo:
"Ma ne welan ket war e zaouarn ar merk euz an tachou,
ma ne lakan ket va biz e toullou an tachou
ha va dorn en e gostez, me ne gredin ket."
26. Eistez goude, emañ an diskibien adarre en ti, ha Tomaz ganto.
Prennet an noriou, setu Jezuz deut e-barz, en e za 'kreiz e ziskibien,
hag e lavar dezo: "Ar peoh ra vo ganeoh!"
27. Goudeze e lavar da Domaz: "Lak da viz amañ, ha gwel va daouarn;
tosta da zorn, ha lak anezañ em hostez:
na jom ket heb kredi, med deus da gouad feiz."
28. Tomaz dezañ neuze: "Va Aotrou ha va Doue!"
29. Ha Jezuz: "Ablamour m'az peus va gwelet, out da gredi;
Eüruz ar re o deus bet feiz heb beza gwelet."
30. Stank eo ar zinou burzuduz all e-neus bet grêt Jezuz
dirag e ziskibien, ha n'int ket skrivet el levr-mañ.
31. Ar re-mañ a zo bet skrivet
ablamour deoh da gredi eo Jezuz ar Zalver, Mab Doue,
ha, dre ho feiz, da gaoud buez en e ano.

An Orezonou war ar bajenn war-lerh...../

OREZONOU evid EIL SUL AR PASK

PEDENN AN DIGOR. - Pedom Doue...

Aotrou Doue, trugarezuz a viskoaz ha da viken,
buezekaad a rit feiz ho pobl gand goueliou ar Pask;
lakit eta da greski ar hras on eus bet diganeoh,
ma komprenim gwelloh pebez badiziant he deus or gwalhet,
ha dre be Spered om bet ganet a-nevez,
ha gand gwad piou om bet prénet.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh...

WAR AR PROVOU.

Digemerit gand madelez, Aotrou Doue, provou ho pugale gristen;
deuet dezo buez nevez dre ar feiz hag ar vadiziant,
grit m'o devo ivez an eürusted peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

PREFAS euz ar zul Fask hag an eizvetez: uhelloh, p. 157,
pe el Levr-overenn aoter, p.46.

GOUDE KOMUNIA. - Pedom asamblez...

Ni ho ped, Doue oll-halloudeg:
goude m'on eus resevet er zakramant ho Mab bet maro evidom
hag adsavet da veo e mister e Bask,
grit deom e zigemer dalhmad e don or halonou.
Eñ on Doue beo, a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

SKRITUR ZAKR EN OVERENN - Kaier n° 14 -

TREDE SUL AR PASK / (28 a viz ebrel 1971)

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (5/27-32, 40b-41)

*** An Ebestel, tan enno prezeg ar feiz goude ar Pantekost,
o deus buan kavet avel a-benn, gand ar memez re o doa
kondaonet Jezuz. Na ped a gristenien, e peb amzer, o deus
ezomm eveldo da veza kennerzet gand ar Spered Santel evid
delher mad d'o feiz!

27. Endeiziou-se, an Ebestel a oa bet kaset dirag Kuzul-meur ar Juzevien,
hag ar beleg-meur e-neus komzet outo evelhénn:
28. "Divenn groñs on-noa grêt ouzoh da brezeg diwarbenn an den-se,
ha, padal, n'eus kén ano, e kêr Jeruzalem,
nemed euz ho kelennadurez, hag e fell deoh c'hoaz
lakaad da goueza warnom gwad an den-se."
(pe: samma hanaom euz laz an den-se)
29. Respont a ra Pèr hag an ebestel:
"Ouz Doue e tleer senti kentoh eged ouz an dud.
30. Doue on tadou eo e-neus savet Jezuz da veo (pe: dazorhet Jezuz),
goude m'ho poa-c'hwi e laket d'ar maro
o staga anezañ ouz koad ar groaz.
31. An dén-se e-neus Doue, dre nerz e zorn, savet d'e renk
a vestr hag a Zalver, evid rei da bobl Israel
keuz ha pardon euz o fehejou.
32. Ha ni 'zo tést war gement-se, ha ganeom ar Spered Santel,
a ro Doue d'ar re a zent outañ."
- 40b. Tud ar Huzul, goude beza grêt skourjeza an Ebestel,
o deus adarre divennet groñs outo prezeg en ano Jezuz,
ha laosket anezo da vond.

41. Int-i, avad, a oa laouen en eur guitaad ar Huzul-meur,
ablamour m'oant bet kavet din da houzañv dismegans evid ano Jezuz.

SALM 29 / 2,4 - 5-6, 11-12a & 13b.

Diskan: Ho meuli a ran, va Doue,
..... rag va laket ho peus war zao.
pe: Alleluia!

2. Ho meuli a ran, va Doue, ablamour m'ho peus va zennet a boan,
heb rei tro d'am enebourien da hoarzin diwar va houst.
4. Ya, Aotrou, tennet ho peus ahanon euz an toull don,
grêt ho peus din adveva a-douez ar re a ziskenn er béz.

5. Kanit meuleudi d'an Aotrou, c'hwi e vignoned,
lavarit bennoz d'e ano santel.
6. Ne bad e gounnar nemed eur predig,
ha penn da benn ar vuez e vadelez:
daelou diouz an noz, ha levenez kerkent hag ar mintin!

11. Selaouit, Aotrou Doue, kemerit truez ouzin
Aotrou, deuit d'am zikour!
12a Troet ho peus evidon ar hañv e dansou laouen.
13b Aotrou, va Doue, ho trugarekaad a rin da viken.

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (5/11-14)

*** An Oan Pask laket d'ar maro eo Or Zalver, ha dezañ
eo dleet ar memez enor ha da Zoue e Dad, azezet war
an tron er weledigez e-neus bet sant Yann.

11. Me, Yann, em gweledigez am eus klever mouez eun niver braz a êlez,
a oa en-dro d'an tron, d'an anevaled beo ha d'ar gozidi;
bez' e oant milmiliadou ha milionadou,
12. o lavared a vouez uhel: "Din eo an Oan a zo bet laket d'ar maro
da reseo galloud ha pinvidigez, furnez ha nerz,
enor, gloar ha bennoz!"
13. Hag ar bed krouet a-bez, en neñv, war an douar, dindan an douar,
hag er mor, gand kement tra 'zo enno,
am eus klevet o lavared:
"D'an hini 'zo azezet war an tron, ha d'an Oan
bennoz, enor, gloar ha galloud, e kantvejou ar hantvejou!"
14. Hag ar pevar aneval beo a lavare: "Amen!"
hag ar Gozidi a zo kouezet d'an douar evid adori.

SALUDOU D'AN AVIEL epad an Amzer Fask, da zibaba ha da gempenn gand Alleluia.
(diwar an "Ordo Lectionum, n° 303)

- 1) Ar Zalver a ranke gouzanv ar maro ha sevel da veo
evid antreal en e hloar. (Luk. 24/46)
2) Me eo ar Pastor mad, eme Jezuz;
anaoud a ran va deñved, hag int am anavez. (Jo. 10/14)
3) Va deñved a glev va mouez;
me o anavez, ha dond a reont d'am heul. (Jo. 10/27)
4) Evid beza va gwelet, Tomaz, e kredez;
Eüruz ar re a gred heb beza gwelet. (Jo. 20/29)
5) Ar Zalver, eur wech savet a-douez ar re varo, ne varv mui;
morse kén ne vo ar maro treh warnañ. (Rom. 6/9)
6) Ma 'z oh savet da veo a-unan gand ar Zalver,
klaskit madou an neñv. (Col. 3/1)

- 7) Salver Jezuz, tést gwirion, kenta ganet a-douez ar re varo,
or hared a rit hag en ho kwad ho peus gwalhet or pehejou.
(Apoc. 1/5)
- 8) Ar Zalver a zo savet da veo hag a skuill e sklerijenn warnom,
goude beza or prenet gand priz e wad.
- 9) Ar Zalver a zo savet beo euz ar bez,
eñ bet staget ouz ar groaz evidom.
- 10) Savet eo da veo Jezuz Krist, krouer peb tra,
kemeret gantañ truez ouz an dud.
- 11) Ni 'oar eo savet Jezuz Krist a varo da veo e gwirionez;
Roue trehour, ho pet truez ouzom!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (21/1-19)

(ma 'z eus tu da grenna:
1/14)

1. En amzer-se, e-neus Jezuz en em ziskouezet adarre d'e ziskibien
war ribl mor Tiberiad, ha setu amañ penaoz.
2. Bez' e oa asamblez Simon Pèr, Tomaz, lesanvet ar Gevell,
Natanael, paotr Kana Bro-Halilea, mibien Zebedea,
ha daou ziskibl all.
3. Lavared a ra Simon Pèr dezo: "Mond a ran da besketa."
Ar re all a lavar dezañ: "Mond a reom ganit, ni ive."
Eet int er-mêz eta, ha pignet er vag,
med a-hed an nozvez-se, n'o deus paket netra.
4. Deut ar mintin, edo Jezuz war an aod;
an diskibien, avad, ne ouient ket e oa-eñ.
5. Jezuz a lavar dezo: "Paotred, ha bez' ho peus eun dra bennag da zebri?"
Respont a reont: "Netra!"

6. Eñ a lavar dezo: "Taolit ar roued en tu dehou d'ar vag, hag e kavoh."
Hen ober a reont, ha ne oant kén evid he zacha ganto,
kement a besked a oa.
7. Neuze an diskibl karet gand Jezuz a lavar da Ber: "An Aotrou eo!"
Simon Pèr, o kleved ez eo an Aotrou,
a stard eur pezh dillad skañv en-dro d'e zargreiz,
rag tennet e-noa e zillad, hag a lamm er mor.
8. An diskibien all a zeu gand ar vag, rag n'edont ket pell diouz an douar,
eur hant metrad bennag,
o stleja war o lerh ar roued leun a besked.
9. Pa 'z int diskennet d'an douar, e welont eun tan glaou beo
gand eur pesk warnañ, ha bara.
10. Jezuz a lavar dezo: "Digasit euz ar pesked ho peus nevez-paket."
11. Simon Pèr a bign er vag hag a zach d'an douar
ar roued leun gand kant tri hag hanter-kant a besked braz.
Ha daoust ma oa kement all anezo, n'eo ket roget ar roued.
12. Jezuz a lavar dezo: "Deuit da gemer ho tijuni (pe: ho lein)."
Nikun euz an diskibien ne gred goulenn outañ: "Piou oh-c'hwi?"
rag gouzoud a reont ez eo-eñ an Aotrou.
13. Jezuz a dosta, a gemer bara hag a ro dezo anezañ,
hag euz ar pesk ive.
14. An deirved gwech e oa da Jezuz d'en em ziskouez d'e ziskibien
goude ma oa savet a-douez ar re varo.
15. Echu o 'fred ganto, Jezuz a lavar da Zimon Pèr:
"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon muioh eged ar re-mañ?"
Respont a ra: "Ya, Aotrou, c'hwi 'oar am eus karantez evidoh."
Jezuz a lavar neuze: "Bez pastor va deñvedigou."
16. Evid an eil gwech e houlenn outañ:
"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?"
Respont a ra: "Ya, Aotrou, c'hwi 'oar am eus karantez evidoh."

- Hag e lavar Jezuz dezañ: "Bez pastor va deñved."
17. Evid an deirved gwech e houlenn outañ:
"Simon, mab Yann, ha kared a rez ahanon?"
Pèr a zav glahar ennañ, ablamour ma houlenn outañ
evid an deirved gwech: "Ha kared a rez ahanon?"
ha respont a ra dezañ: "Aotrou, c'hwi 'anavez peb tra,
c'hwi 'oar am eus karantez evidoh."
Jezuz a lavar dezañ: "Bez pastor va deñved."
8. E gwirionez, m'hen lavar dit:
Pa oas yaouankoh, e lakes da-unan da houriz en-dro dit,
hag ez ees d'al leh ma kares;
med pa vi deut koz, eh astenni da zivreh,
hag unan all a lako dit da houriz
hag a gaso ahanout d'al leh na 'fell ket dit."
9. Kement-se e-neus lavaret Jezuz evid rei da intent
dre beseurd maro e tle Pèr renta gloar da Zoue.

***** OREZONOU evid TREDE SUL AR PASK *****

PEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, goude beza digaset d'ho pobl nerz ha yaouankiz nevez,
grit ma chomo da viken el levenez;
joa ennom bremañ gand an enor da veza ho pugale,
dalhit stard ennom an esperans,
da hortoz an deiz ma savim a varo da veo.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.-
B. Amen.

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad
d'ar provou a ginnig deoh an Iliz e-kreiz levenez ar Pask;
goude beza digaset dezi joa ken braz,
grit ma vleunio enni al levenez da viken.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS : unan euz re an Amzer Fask, uhellou, p. 158.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom asamblez...

Sellit gand madelez ouz ho pobl, Aotrou Doue:
pegwir ho peus roet deom buez nevez dre ho sakramañchou,
dalhit, ni ho ped, d'on heñcha ha d'on diwall
beteg ma kavim, korv hag ene, gloar an adsao da veo.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

*** Notadenn droidigez evid ar bedenn diweza-mañ.

Latin: Populum tuum, quaesumus, Domine, intueri benignus,
et quem aeternis dignatus es renovare mysteriis,
ad incorruptibilem glorificandae carnis resurrectionem pervenire
concede.

Testenn "imposubl", hag e galleg zokén n'eo ket troet gér evid gér.
Petre eo an "aeterna mysteria" en eil linenn? Lakeet on eus, evel e galleg:
"ho sakramanchou". Hogen, marteze - ha kentoh - ez eo ar venoz, ar volonte
a viskoaz e-neus Doue diwar-benn silvidigez an dud, menoz chomet kuzet
beteg m'eo deut ar Zalver ha diskuliet gantañ d'ar re a gred ennañ.
Neuze e heller kinnig: "pegwir ho peus, evel ma oa a-viskoaz ho menoz
kuzet (pe: kuz), roet deom buez nevez..."

PEVARE SUL AR PASK / (2 a viz mae 1971)

ENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (13/43-52)

*** Sant Paol a zo bet misioner bras én amzeriou kenta an Iliz. Prezeget e-neus ar feiz d'ar bayaned, e-leh chom war-dro ar Juzevien hebkén. En on amzer-ni, ar gristenien o deus ezomm d'en em voda kenetrezo evid maga o feiz, med bez' e tleont sonjal ive penaoz-rei da anaoud Or Zalver d'ar re a vev pell dioutañ.

4. En deiziou-se, Paol ha Barnabaz a oa digouezet e kêr Antiokia, e bro Bisidia. Da zeiz ar zabad, int eet d'ar zinagog.
(hag éno, goude ar pennadou Skritur Zakr, int bet pedet da ober ar brezegenn, ha Paol e-neus roet dezo da anaoud Jezuz, Mab Doue ha Salver, maro ha savet da veo.)
2. P'edont o vond er-mêz, ez int pedet evid ar zabad war-lerh da zisplega c'hoaz an traou-se.
3. Goude an digouvi euz ar zinagog, kalz euz ar Juzevien hag euz ar re a heulie o relijion a zo eet da heul Paol ha Barnabaz; ar re-mañ, o tivizoud ganto, a roe dezo ali stard da zerhel mad da hras Doue.
4. D'ar zabad war-lerh, koulz lavared kêr a-béz en em gav bodet evid selaou komz Doue.
5. O weled pegement a dud a zo, ar Juzevien a grog gwarizi enno hag en em lak da zislavared komzou Paol, gand blasfemou zokén.
6. Heb kemer aon, Paol ha Barnabaz a lavar dezo:

"Deoh-c'hwi da genta e rankem lavared komzou Doue, med, pegwir ne 'fell ket deoh o digemer ha n'en em gavit ket din euz ar vuez peurbaduz, setu e troom-ni war-zu ar bayaned.

47. Rag evelse eo bet gourhemennet deom gand an Aotrou:
"Laket am eus ahanout da sklerijenn ar broadou payan, da gas ar zilvidigez beteg pennou pella ar bed."
48. O klevet kement-se, ar bayaned a zo bet laouen braz, ha meuleudi a roent da gomz an Aotrou Doue, ha deut eo d'ar feiz ar re oll a oa merket gand Doue evid ar vuez peurbaduz.
49. Neuze, komz an Aotrou a zo eet d'en em skigna a-dreuz ar vro-se a-béz.
50. Med ar Juzevien o doa sachet diouz o zu
ar merhed a renk uhel deut d'o relijion, hag ive pennou braz kêr, ha laket evelse da zevel heskinerez a-eneb Paol ha Barnabaz; deut int a-benn d'o argas er-mêz euz douar o hêr.
51. An daou abostol, neuze, o veza strillet (pe: hejet) warno ar bouldrenn euz o zreid, a zo eet da gêr Ikonion.
52. Hag an diskibien a oa leun o halon a levenez er Spered Santel.

SALM 99 / 2, 3, 5.- Diskan: Ni 'zo pobl an Aotrou Doue,
..... an deñved renet gand e zorn.
pe: Alleluia!

2. Kanit laouen enor d'an Aotrou Doue dre an douar a-béz, deuit da zervij an Aotrou gand levenez, antreit dirazañ gand ho kalon o tridal.
3. Sonjit mad ez eo an Aotrou ar gwir Doue; eñ e-neus grêt ahanom, ha ni 'zo dezañ, bez' om e bobl hag an deñved renet gantañ.

Ya, mad eo an Aotrou Doue: da viken e pado e vadelez,
hag a rumm da rumm eo fidel d'e hér.

(pe: morse, a rumm da rumm, ne dorr e hér.)

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (7/9, 14b-17)

*** Er weledigez-mañ, ar mor a dud digouezet er vuez eüruz
o deus da bastor an Can, da lavared eo Or Zalver.

0. Me, Yann, am eus gwelet eur mor a dud, n'helle den konta ped e oant,
euz kement bro, kement rumm, kement pobl ha kement yéz a zo,
oll en o zav dirag tron Doue ha dirag an Oan,
dillad gwenn ganto ha skourrou palmez en o daouarn.

b Unan euz ar Gozidi (pe: ar re goz) e-neus lavaret din:

"Ar re-ze eo ar re 'zo o tond euz an drubuill vraz:
gwalhet o deus o dillad, ha kannet anezo e gwad an Oan."

0. Setu perag emaint dirag tron Doue,
ouz e zervichâ deiz ha noz en e zantual,
hag an hini 'zo azezet war an tron a raio e zemeurans ganto.

0. N'o devo mui naon na sehed,
ne vint mui skoet gand an heol na tommder ruz ebed;

0. rag an Oan, an hini 'zo e-kreiz an tron, a vo o fastor,
evid o rén (pe: heñcha) daved feunteuniou dour ar vuez,
ha Doue a zeho an oll daelou euz o daoulagad."

LUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Me eo ar Pastor mad, eme Jezuz;
me 'anavez va deñved, hag int am anavez. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (10/27-30)

27. En amzer-se, Jezuz a lavare d'ar Juzevien:

"Va deñved-me a zelaou va mouez,
me o anavez, hag int a zeu d'am heul.

28. Me a ro dezo ar vuez peurbaduz; ne daint biken da goll,
ha nikun n'o diframmo euz va dorn.

29. Va Zad eo e-neus roet anezo din, hag eñ 'zo brasoh eged an oll;
kement am eus bet digand va Zad a dalv muioh eged peb tra all,
ha den ebed n'hell diframma netra euz dorn va Zad.

30. Va Zad ha me n'om nemed unan."

***** OREZONOU evid PEVARE SUL AR PASK *****

PEDENN AN DIGOR - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
rénit ahanom da gaoud perz en eürusted n'eus dezi fin ebed,
ma hello poblad ho tud fidel, deñved dister ha dinerz, erruoud evid mad
el leh m'eo kerzet o Fastor en o raog dre e nerz-kalon hag e halloud:
Eñ Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo.....

WAR AR PROVOU - Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vim laouen bepred

gand ar goueliou-mañ en enor da Bask Or Zalver;
labour or zilvidigez kendalhet heb ehan dre zakrifis an aoter
ra dalvezo deom al levenez peurbaduz. Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

--- Prefas: unan euz re an Amzer Fask, p. 158 ---

GOUDE KOMUNIA - Tad oll-halloudeg, Pastor mad, diwallit gand karantez
poblad ho teñved;* goude beza o zaveteet gand gwad ho Mab,
grit dezo mond da veva eüruz e (prajou glaz) ar baradoz. Dre J.K.O.Z.

PEMPED SUL AR PASK (9 a viz mae 1971)

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (14/21-27)

*** En eur echui e droiad misioner, sant Paol a zistro
da vizita ar gristenien e-neus gounezet d'ar feiz,
evid diazeza stard an ilizou nevez.

21. Goude beza prezeget an Aviel e kêr Derbe
ha gounezet eun toullad mad ziskibien,
Paol ha Barnabaz o doa kemeret hent an distro
da gêriou Listra, Ikonion hag Antiokia.
22. Poania 'reent da greñvaad ar feiz en eneou an diskibien
ha da rei kalon dezo evid delher mad d'o feiz,
o lavared ez eo a-dreuz kalz trubuilhou
e rankom antreal e rouantelez Doue.
23. Da lakaad en o fenn, e peb Iliz, o deus grêt dibaba beleien,
grêt o deus evito pedennou gant yunou,
ha fiziet anezo en Aotrou Krist, an hini o doa laket ennañ o feiz.
24. O veza treuzet Bro-Bisidia, ez int deut da Vro-Bamfilia.
25. Goude beza prezeget komz Doue e Perge, e tiskennont da gêr Attalia;
26. hag ahano ez eont dre vor beteg kêr Antiokia Bro-Siri,
penn kenta o beaj, 'leh ma oant bet fiziet e gras Doue
evid al labour o doa bremañ kaset da benn.
27. Digouezet éno, e reont boda ar re a oa euz an Iliz
evid displega dezo pegen kaer traou e-noa grêt Doue ganto,
ha penaoz e-noa digoret d'ar bayaned an nor d'ar feiz.

SALM 144 / 8-9, 10-11, 12-13ab.- Diskan: Kanom bennoz da Zoue da viken,
..... Kanom bennoz da Zoue. (ton Kant.10)
pe: Alleluia!

8. Leun a drugarez hag a vadelez eo an Aotrou Doue,
Pell a-barz têri ha braz kenañ e vadelez.
9. Mad eo an Aotrou ouz an oll, ha trugarezuz ouz e oll grouadurien.
10. C'hwi 'vo meulet gand hoh oll grouadurien, Aotrou Doue,
hag ho tud fidel ho pennigo.
11. Displega 'raint gloar ho rouantelez, skigna 'raint brud ho kalloud.
12. Evid ma vo anavezet gand an dud pegen braz eo ho kalloud
ha pegen skeduz gloar ho rouantelez.
13. Dre ho rouantelez, c'hwi 'zo roue da virviken,
dre ho kalloud, ez oh ar mestr a rumm da rumm.

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (21/1-5a)

*** Eur weledigez c'hoaz euz ar bed nevez, digoret an nor
anezañ dre Or Zalver savet a varo da veo.

1. En deiziou-se, me, Yann, am eus gwelet eun neñv nevez hag eun douar nevez,
rag an neñv kenta hag an douar kenta a oa eet ebiou (pe: da get),
hag ar mor n'eus mui anezañ.
2. Ha me, Yann, am eus gwelet ar gêr zantel, Jeruzalem nevez,
o tiskenn euz an neñv, a gichen Doue,
kempennet evel eur wreg nevez fichet evid he gwaz.
3. Ha klevet am eus eur vouez kreñv o tond euz an tron, hag a lavare:
"Setu demeurens Doue gand an dud, bez' e vo o chom ganto,
int a vo e bobl, ha Doue e-unan a vo ganto.

Seha a raio Doue an oll daelou euz o daoulagad,
hag ar maro ne vo mui anezañ;
ne vo mui na kañv, na klemm, na poan,
rag ar bed kenta a vo eet ebiou (pe: da get)."
Hag an hini 'oa azezet war an tron e-neus lavaret:
"Setu emañ oh ober nevez peb tra."

LUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Eur gourhemenn nevez a roan deoh:
En em garit 'vel m'am eus ho karet. - Alleluia!

NNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (13/31-33a, 34-35)

. E kerz ar Goan diweza, goude ma oa eet Judaz kuit,
Jezuz e-neus lavaret d'e ziskibien:
"Bremañ Mab an den a zo bet roet dezañ e hloar,
ha Doue drezañ a zo bet roet dezañ e hloar.
. Pegwir eo bet, drezañ, roet e hloar da Zoue,
emañ Doue, d'e dro, o vond da rei dezañ e hloar e-unan,
hag hebdale he roio dezañ.
a Va vugaligou, evid eur pennadig hebkén emañ c'hoaz ganeoh.
. Eur gourhemenn nevez a roan deoh: En em garit an eil egile;
ya, evel m'am eus ho karet,
c'hwi, d'ho tro, en em garit an eil egile.
Diouz kement-mañ e ouezo an oll ez oh diskibien din:
m'ho peus karantez an eil evid egile."

OREZONOU evid PEMPED SUL AR PASK

PEDENN AN DIGOR. - Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi ho peus digaset deom ar Zalver
ha grêt ahanom ho pugale;*
sellit 'ta gand madelez ouz ar re ho peus evito karantez eun Tad:
ablamour d'o feiz er Zalver, grit ma vevint er frankiz gwirion
ha ma hounezint ar vuez peurbaduz.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. - Amen.

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, e sakrifis an overenn e tigemerit or provou
hag e rit deom, en distro, kaoud perz en ho puez divin:*
goulenn a reom diganeoh, pa 'z om deut da anaoud ho kwirionez,
ar hras da zelher stard dezi en or buez penn da benn.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS: unan euz re an Amzer Fask, p. 158.

GOUDE KOMUNIA - Pedom asamblez...

Aotrou Doue, chomit tost da boblad ho tud fidel,
ho peus digoret dezo feunteun ho sakramanchou:*
grit dezo en em zistaga diouz plegou fall o hoz natur
evid en em rei d'ar vuez nevez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

C'HWEHVED SUL AR PASK / (16 a viz mae 1971)

ENNAD EUZ LEVR AOBEROU AN EBESTEL (15/1-2, 22-29)

*** Ar gristenien genta a oa Juzevien, evel just, boazet da heulia lezenn Moizez. Prest e oant da zigemer en Iliz ar bayaned deut d'ar feiz; med lod anezo a zonjet e oa rekis d'ar re-ze reseo an emdroh (galleg "circoncision") evel do, ha lod all, sant Paol en o fenn, a lavare eo tra-walh kaoud feiz e Jezuz Krist. Setu ar gudenn (pe: an afer) a lake disparti ha beh etre ar gristenien genta, hag evid digas ar peoh eo bet grêt ar Honsil kenta.

- . Epad m'en em gave Paol ha Barnabaz e kêr Antiokia, tud deut euz Bro-Judea a glaske kelenn an dra-mañ d'an diskibien euz ar gêr-se: "Ma ne vezit ket amdrohet hervez lezenn Moizez, n'hellit ket beza salvet."
- . En o eneb ez eus savet trouz ha tabud (pe: rendael) stard a-berz Paol ha Barnabaz. Neuze eo bet divizet ez afe Paol ha Barnabaz, gand eun nebeudig tud all, beteg Jeruzalem, da houlenn ali an Ebestel hag ar veleien war ar gudenn-se.
2. Evid echui, an Ebestel hag ar veleien, a-unan gand Iliz Jeruzalem a-bez, o deus grêt o zonj kemer tud euz o zouez da gas da Antiokia asamblez gand Paol ha Barnabaz. Bez' e oant Jud, lesanvet Bar-Sabbaz, ha Silaz, o daou tud hag o doa levezon (pe: pouez) e-touez o breudeur.

23. Al lizer-mañ o deus roet dezo:

"Ni, an Ebestel hag ar veleien, ho predeur, d'ar bredeur euz Antiokia, Bro-Siri ha Bro-Gilikia deut a douez ar bayaned, salud deoh.

24. Klevet on eus e oa eet tud euz or re-ni, heb urz ebed diganeom, hag o doa strafuillet ahanoh gand o lavariou ha taolet douetans en ho sperejou.
25. Setu om bet a-du (pe: on eus divizet), oll a-unan, da zibaba tud da gas davedoh gand or bredeur kêr, Paol ha Barnabaz, anezo tud hag o deus gouestlet o buez e servij Jezuz Krist, on Aotrou.
27. Kas a reom deoh eta Jud ha Silaz, hag a zisplego deoh dre gomz ar memez tra, da lavared eo:
28. A du om bet, ar Spered Santel ha ni, da jom heb ho samma gand beh all ebed, nemed kement-mañ a zo red:
29. dioueri boued bet provet d'an idolou, gwad ha kig gand e wad, hag en em vired diouz an hudurniez. En em ziwallit diouz kement-se, hag e reoh mad. Or gourhemennou deoh."

SALM 66 / 2-3, 5, 6 & 8.- Diskan: Poblou ar bed d'ho meuli, va Doue, An oll boblou d'ho meuli!
pe: Alleluia!

2. Plijet gand Doue skuill warnom e drugarez hag e vennoz, plijet gantañ diskouez deom dremm (pe: bizaj) laouen,
3. ma hellim rei da anaoud dre ar bed ho lezenn zantel, hag e-touez an oll boblou ho silvidigez.

5. Joa ha levenez d'an oll boblou, rag c'hwi 'zo just o houarn ar bed,
c'hwi 'zo reiz o rén ar poblou,
hag ouz o heñcha war an douar-mañ.

6. Bezit meulet, o Doue, gand poblou ar bed!
Ya, meuleudi deoh gand an oll boblou!

7. Doue d'or benniga, ha da veza doujet dre an douar a-béz.

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND SANT YANN ABOSTOL (21/10-14, 22-23)

*** Splanner Doue hag e rouantelez ne hell beza livet gand
netra euz ar bed-mañ; ha koulskoude, er pennad-mañ,
sant Yann a glask rei deom da intent pegen kaer eo.

0. E-kerz va gweledigez, eun êl e-neus va douget e spered
war eur menez braz hag uhel,
hag e-neus diskouezet din ar gêr zantel, Jeruzalem,
o tiskenn euz an neñv a gichen Doue.

1. Bez' e oa dezi splanner Doue; ar pezh a roe sked (pe: sklêrded) dezi
a oa heñvel ouz eur mên priziuz meurbed,
ouz eur mên yalp ("jaspe" e galleg), dezañ lufr ar hristal.

2. Bez' he doa eur voger vraz hag uhel, enni daouzeg dor
diwallet gand aouzeg êl, ha skrivet warno anoiou,
re an daouzeg meuriad (pe: rummad) euz bugale Israel.

3. Diouz tu ar zav-heol, teir dor; diouz tu an hanter-noz, teir dor;
diouz tu ar hreisteiz, teir dor; ha diouz tu ar huz-heol, teir dor.

4. Moger kêr a oa diazezet war zaouzeg mên,
skrivet warno anoiou daouzeg abostol an Oan.

5. Templ ebed n'am eus gwelet e kêr, rag an Aotrou, an Doue oll-
halloudeg, a zo an templ anezi, hag an Oan ive.

23. Ha kêr n'he deus ezomm ebed euz an heol nag euz al lo r
d'he sklerijenna,
rag gand gloar Doue eo sklerijennet, hag an Oan eo he goulou.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Neb am har a viro va homzou;
va Zad e garo, ha ni a zeuio davetañ.-

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (14/23-29)

Goude ar Goan diweza, o tivizoud gand e ziskibien,
Jezuz a lavare dezo:

23. "N'eus forz piou, ma kar ahanon, a viro va homzou:
neuze va Zad e garo, dond a raim beteg ennañ,
hag on demeurens a raim ennañ.

24. An neb na gar ket ahanon, ne vir ket va homzou.
Hogen, ar homzou a glevit n'eo ket va re-me int,
med re an hini on bet kaset gantañ, an Tad.

25. Kement-mañ 'zo bet lavaret ganin, epad m'emaon o chom en ho kichen.

26. Med bez' ho po en ho kichen ar Spered Santel,
a vo kaset gand va Zad euz va 'ferz:
hennez a roio deoh kelennadurez war beb tra
hag a zigaso soñj deoh euz kement am eus lavaret deoh.

27. Ar peoh a lezan ganeoh, va feoh-me a roan deoh,
n'eo ket evel ma ro ar bed e roan-me anezañ deoh.
Na strafuill, na spont eta en ho kalonou!

28. Klevet ho peus e lavaren deoh: Mond a ran kuit, ha dond a ran davedoh.
Ma karfeh ahanon, e vefeh laouen
ablamour ma 'z an da gaoud an Tad, rag brasoh egedon eo an Tad.

29. Ha bremañ eo am eus hen lavaret deoh, araog ma tigouezo,
evid m'ho pezo feiz pa vo digouezet."

OREZONOU evid C'HWEHVED SUL AR PASK

EDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, anddeiziou-mañ leun a joa,
gouestlet ganeom en enor d'Or Zalver savet da veo,
a houlennom ar hras d'o lida penn da benn a wir galon,
evid ma ouezim mired beo dre on oberou en or buez
ar pez a heuliom dre ar zoñj en or spered.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh...

AR AR PROVOU.-

Ra zavo or pedennou beteg ennoh, Aotrou Doue,
da heul provou ar zakrifis,
evid ma hellim, nêteet or halonou dre ho trugarez,
beza e stad vad da gemer perz e sakramanchou ho karantez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

OUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, evid ar vuez peurbaduz
e rit ahanom krouadurien nevez dre Or Zalver savet da veo:*
lakit eta mister e Bask da zougen ennom frouez e-leiz,
ha roit nerz d'or halonou diwar ar magadur a zilvidigez
on eus bet er zakramant.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

** Prefas: unan euz re an Amzer Fask, p. 158.

+++++

GOUEL AR YAOU-BASK (20 a viz mae 1971)

PENNAD DIGOR DA LEVR OBEROU AN EBESTEL (1/1-11)

*** Sant Lukaz a gont deom amañ, hirroh eged en e Aviel,
penaoz eo bet pignet Jezuz d'an neñv.

1. Al levr kenta am eus grêt, Teofil kër, diwarbenn an oll draou
e-noa grêt Jezuz, e oberou hag e gelennadurez,
2. adaleg an deiz kenta beteg an deiz m'eo bet pignet d'an neñv,
goude beza roet e gemennaduriou, ar Spered Santel gantañ,
d'an Ebestel e-noa bet dibabet.
3. Dezo e-neus diskouezet sklêr e oa beo adarre war-lerh e Basion,
o rei liez merk a gement-se,
pegwir, epad daou-ugent dervez, e teue dirag o daoulagad
hag e komze ganto diwarbenn rouantelez Doue.
4. Edo o preja (pe: o tebri) ganto, ha setu e ro urz dezo
da jom heb kuitaad Jeruzalem, med chom éno da hortoz
m'o devo bet promesa an Tad,
"an hini, emezañ, ho peus klevet diganin;
rag Yann a roe ar vadiziant gand dour,
med c'hwi, er Spered Santel eo
e vezoh badezet abarz pell ahann."
6. Neuze, ar re 'zo en-dro dezañ a houlenn outañ:
"Aotrou, ha bremañ eo emaoñ o vond da zevel en-dro
ar rouantelez evid pobl Israel?"
7. Hag en da respont: "N'eo ket deoh da anaoud ar mare pe an deiz
e-neus an Tad divizet euz e berz e-unan.
8. Med emaoñ bremañ o vond da reseo eun nerz,
hini ar Spered Santel o tiskenn ennoh.

Ha c'hwi 'vo téstou din, e kêr Jeruzalem, e bro Judea
 ha Samari a-béz, ha beteg ar penn pella euz ar bed."
 9. O veza lavaret kement-se, dirazo digor braz o daoulagad,
 Jezuz a zo douget d'an neh,
 hag eur goumoulenn a zeu d'e guzad diouz o daoulagad.
 10. Chom a ra o zellou troet warzu an neñv,
 e keit ha m'emañ Jezuz o vond kuit;
 ha setu daou zen, dillag gwenn ganto, deut en o hichen,
 hag a lavar dezo: "Gwazed Bro-Halilea, perag e chomit aze
 da zelled ouz an neñv?
 Ar memez Jezuz, douget d'an neñv bremañ euz ho touez,
 a zeuio en-dro en doare m'ho peus e welet o sevel d'an neñv."

LM 46 / 2-3, 6-7, 8-9 - Diskan: Gwerzad 6 "Emañ Doue o sevel..."
 pe:(Kant. n° 70) Jezuz, en eil mister a hloar,
 A zeu da guitaad an douar;
 Sevel a ra d'ar baradoz,
 Eno emañ ouz va gortoz.

Poblou ar bed, stlakit ho taouarn ha savit ho mouez;
 en enor d'an Aotrou Doue youhit gand levenez.
 Bez' eo an Aotrou mestr an neñvou, roue braz war an douar a-bez.

Emañ Doue o sevel d'an neh e-kreiz eur mor a gan,
 an Aotrou ouz son an drompill.
 Kanit gloar da Zoue, kanit 'ta! Kanit enor d'ar roue, kanit oll.
 Roue an douar a-bez eo Doue: kanit salmou a zoare.
 Da Zoue eo ar rouantelez war an oll vroïou,
 emañ Doue azezet war e dron santel.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (1/17-23)

*** Sant Paol a denn evidom ar gentel euz mister an deiz-mañ:
 Jezuz, pignet d'an neñv, a zo uhelleet dreist peb tra.

17. Plijet gand Doue Or Zalver Jezuz Krist, an Tad a zo dezañ peb gloar,
 rei deoh eur spered a 'furnez hag a sklerijenn
 evid kaoud gwir anaoudegez anezañ.
18. Plijet gantañ sklerijenna daoulagad ho kalon, (pe:sellou ho spered)
 deoh da houzoud da bebez esperans e-neus ho kalvet,
 peseurd teñzor a hloar a roio deoh d'ho lod e-touez ar Zent,
19. ha pegen braz eo e halloud evidom-ni, ar re o deus ar feiz.
 Bez' eo ar galloud-se kreñv ha nerzuz,
20. hag e ziskouezet e-neus e-keñver an Aotrou Krist,
 p'e-neus grêt dezañ sevel a douez ar re varo
 ha mond d'azeza en deou dezañ en neñvou,
21. kalz uhelloh eged kement nerz ha galloud a zo a-uz deom,
 daoust pe ano o deus, koulz er bed-mañ hag en hini da zond.
22. Peb tra e-neus lakeet dindan e dreid,
 ha grêt e-neus anezañ ar penn euz ar horv ma 'z eo an Iliz;
23. rag gand an Iliz eo e teu an Aotrou Krist da gaoud e vent,
 eñ ha ne zeu d'e vent nemed e oll izili gantañ.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! It dre ar bed,
 grit euz an oll boblou diskibien din;
 setu emañ ganeoh bemdez beteg fin ar bed.
 pe: Meuleudi deoh, Aotrou Krist,
 pignet d'an neñv e gloar an Tad!

ENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (24/46-53)

En amzer-se, goude ma oa bet savet da veo,

Jezuz a lavare d'e ziskibien:

6. "Evelse eo merket er Skritur Zakr:

e tle ar Mesiaz gouzañv ar maro

ha sevel a douez ar re varo d'an trede deiz,

7. hag e tle beza prezeget en e ano ar heuz d'ar pehejou

evid ar pardon anezo, d'an oll boblou euz ar bed,

en eur gomañs gand Jeruzalem.

8. C'hwi eo a zo tést a gement-se.

9. Emaon-me o vond da zigas deoh promessa va Zad;

ha c'hwi, chomit e kêr da hortoz ma vo deut deoh

an nerz euz an neñv."

0. Goudeze, e-neus Jezuz kaset anezo d'e heul beteg tost da Vetani;

savet gantañ e zaouarn, e-neus benniget anezo,

1. hag, epad ma roe dezo e vennoz, e pella diouto

hag e oa douget d'an neh warzu an neñv.

2. An diskibien, goude beza stouet d'e adori,

a zo neuze distroet e kêr Jeruzalem, levenez vraz en o halon.

3. Hag e vezent dalhmad en templ, o rei meuleudi ha bennoz da Zoue.

(Amañ eo echu an Aviel hervez sant Lukaz).

OREZONOU evid GOUEL AR YAOU-BASK

PEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, kargit or halonou a levenez hag a anaoudegez vad,*
rag, da heul Or Zalver, ho Mab, pignet d'an neñv,

on eus dija, ni ivez, gounezet an treh

ha, pa 'z eo antreet en e hloar, eñ ar penn euz ar horv m'eo an Iliz,

e-neus ar horv ive, gand e oll izili,

esperans stard d'en em gaoud er memez eürusted.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh...

WAR AR PROVOU -

Aotrou Doue, gand eur galon izel e kinnigom deoh ar zakrifis
en deiz ma reom gouel ho Mab pignet d'an neñv;

goude beza digemeret or provou, roit deom en distro ar grasou
or zikouro da vond, ni ivez, beteg ar baradoz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

PREFAS - (da lavared beteg derhent ar Pantekost)

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,

dre Jezuz Krist, or Zalver.

Rag, goude beza savet a-douez ar re varo,

e-neus Jezuz en em ziskouezet beo d'e oll ziskibien

ha, dirag o daoulagad, ez eo pignet d'an neñvou,

evid on lakaad da gaoud perz en e natur a Zoue.

Setu perag, e-kreiz levenez ar Pask skuillet e peb leh,

emañ war an douar pobl an dud vadezet o tridal,

hag en neñv emañ an êlez hag an oll sperejou eüruz

o kana meuleudi d'ho kloar, heb ehan ha da viken:

HOUE KOMUNIA - Pedom asamblez...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, c'hwi ho peus ar vadelez
da lakaad en on daouarn , ha ni c'hoaz war an douar, ar madou
euz an neñv;*
grit deom, ni ho ped, trei oll nerz or bolontez hag or halon
da gerzed warzu ar baradoz,
e-leh m'e-neus Or Zalver douget on natur-dén en ho kichen.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. - Amen.

***** Notadennou troidigez *****

An orezonou-mañ a oa bet, warlene, troet diwar ar galleg (cf.
Kaier n° 5, p.25), pa ne oa ket embannet c'hoaz ar "Missale Romanum".
ablamour da ze, ez eus kemmou, ha n'int ket bian awechou.

Hogen, n'eo ket awalh mond tostoh d'an destenn latin, evid
beza sklav dezi. Mad e vo eta, d'an neb a hello, gweled pehini euz on
roidigeziou, a laka gwelloh ar gristenien da bedi.

Setu amañ lod euz al latin:

-) Fac nos, omnipotens Deus, sanctis exsultare gaudiis et pia gratiarum
actione laetari,* quia Christi Filii tui ascensio est nostra provectio,
et quo processit gloria capitis, eo spes vocatur et corporis. Per...
-) Sacrificium, Domine, pro Filii tui supplices venerabili nunc ascensione
deferimus: praesta, quaesumus, ut his commerciiis sacrosanctis
ad caelestia consurgamus. Per...
-) Omnipotens sempiterne Deus, qui in terra constitutos divina tractare
concedis, praesta, quaesumus, ut illuc tendat christianae devotionis
affectus, quo tecum est nostra substantia. Per...

SEIZVED SUL AR PASK (23 a viz mae 1971)

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (7/55-60)

*** Klevom sant Stevan, ar merzer kenta. Ar merzer a zo eun
test, hag a zoug testeni d'ar wirionez beteg rei e vuez.
Stevan a zo amañ o vond da echui e desteni.

- 55. En deiziou-se, setu Stevan dirag ar Juzevien a glask e gondaoni.
Ar Spered Santel o leunia e galon, e zellou troet warzu an neñv,
e-neus gwelet gloar Doue ha Jezuz en e zav en tu deou da Zoue;
- 56. Hag e-neus lavaret: "Setu e welan an neñvou digor,
ha Mab an den en e zav en tu deou da Zoue."
- 57. Ar Juzevien en em lak da youhal (pe: da grial) a bouez penn,
en eur stouva (pe: stañka) o diskouarn,
hag oll asamblez e saillont warnañ.
- 58. E vounta a reont er-mêz euz kêr, ha staga da stlepel mein warnañ.
An testou a daol o mantilli e-harz breid eur paotr yaouank
anvet Saoul.
- 59. Hag int krog d'e laza a daoliou mein;
Stevan, e keit-se, a oa o pedi hag a lavare:
"Aotrou Jezuz, digemerit va ene."
- 60. Goudeze, eet war e zaoulin, e-neus kriet a vouez kreñv:
"Aotrou, na zalhit ket outo ar pehed-mañ."
Ha war-lerh ar homzou-se, eo kouezet e kousk ar maro.

SALM 96 / 1-2b, 6 & 7c, 9 - Diskan: Da Zoue ar rouantelez!

..... Mestr eo war ar bed a-béz.

pe: Alleluia!

1. D'an Aotrou Doue eo ar rouantelez, (pe: Roue eo an Aotrou Doue)
Ra drido kalon an douar! Levenez d'an inizi pella!
- 2b Harpet eo e dron war ar justis hag ar gwir.

6. Moueziou an neñvou a embann e justis,
hag an oll boblou a dro o zellou da weled e hloar.
- 7c Stoui a ra dirazañ an oll aotronez euz ar bed.

9. Bez' oh, Aotrou Doue, uhel-meurbed dreist an douar a-béz,
uhel-meurbed dreist an oll aotronez.

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (22/12-14, 16-17, 20)

*** Da echui e weledigez diweza, sant Yann e-neus komzou
dudñuz diwarbenn distro Or Zalver, a hortozom laouen.

12. Me, Yann, am eus klevet eur vouez o lavared din:
"Emaon o tond hebdale, ha va govr a vo ganin
evid rei da bep hini hervez e labour.
13. Bez' on an alfa hag an omega, ar henta hag an diweza,
ar penn kenta hag ar fin.
14. Eüruz ar re a oar gwalhi o gwiskamant, evid kaoud gwir war frouez
ar wezenn a vuez, hag antreal er gêr zantel dre an noriou.
15. Me, Jezuz, am eus kaset va êl da rei testeni deoh a gement-se
evid an Ilizou.

193
17. An Spered ha quid an Daz a lavar: "Deuit!"
An neb a glev ra lavaro: "Deuit!"
An neb e-neus sched ra quid da eva.
An neb e-neus e'hoant ra gement euz dous ar vuez vid neta.

20. Ha lavared a ra an inizi a zoug testeni euz an trevou-se:
"Ya, deoh a ran digale."
Amen! Deuit, Aotrou Jezuz!

Salud d'an Arvid, Alleluia! Meulad deoh, Aotrou Krist!
Vi hortoz laouen ho tistro.. Alleluia!

- Pennad euz Arvid Jezuz-Krist hervez Sant Yann (17/20.26)
Arasg Kristad ar bed. mañ, eus Jezuz o pedi e Dad arvelhenn:
20. Tad santel, n'eo ket heblen evid an diskibien a zo amañ emañ o pedi,
ved ivez evid ar re o devo feiz unan diwar o lavaro.
21. Grit ma vezint oll unan heblen,
evl m' emañ - e'hoi, Tad, unan - ma ha me emañ,
grit dez o ive beza unan heblen unan,
evid ma kredo ar bed e zo ganeoh an bet kaset.
22. An hebar an - us bet diganeoh an - us roet dez o,
evid ma vint unan heblen, evid ma'z om - ni unan.
23. Me emañ, ha e'hoi unan, evid ma vint unan da vad,
ha ma ouzo ar bed e zo ganeoh an bet kaset
hag ho - peus o kaset evid m'ho - peus va kaset-me.
24. Tad, ar re ho peus roet din, a fell din e refent ivez gannin e-leh ma
vezint